

Feiz·ha·Breiz



KERZU 1927



*Ar parreziou, m'eman ar Feiz o vont war
wannaat enno, eo ar parreziou a zo o trei
war ar galleg ; war-ze, den n'am disla-
varo !*

Komzou an A. Breurec, warlene, e Bleun-Brug Gwened.

N'achetez pas de meubles avant d'avoir visité la

GRANDE FABRIQUE de MEUBLES

BRETONS, MODERNES, LOUIS XVI et ANCIENS

Maison Louis QUEMENEUR

Fondée en 1905 Sculpteur Breton

Grand choix de Salles à Manger et Chambres à Coucher en tous genres.

Meubles à l'usage de la Campagne

Magasins de vente et d'exposition : 37, rue Louis-Pasteur, BREST

Usines à Saint-Pierre-Quilbignon

Téléph. 8-51

Tud an ti a oar brezoneg.

Une visite s'impose

Livraison par camion-auto

Hangars agricoles métalliques

Charpentes métalliques
Ponts en fer
Tour

Serrurerie d'Art
Toutes pièces forgées et estampées.

J. BERTHOMIER

Constructeur

90, rue Jean-Jaurès, BREST Tél. 2-75

Fermatures de magasins
Persiennes en fer
Grilles articulées
Monte-charge et monte-plats

Silos métalliques
À fourrages et Gautier

Représentant de La Maison
Jaquez et Harnet, Paris.

Représentant des Ateliers et Fonderies
Gastin fils, Paris.

Tous projets et devis gratuits sur demande.

Ti kos L'OLLIEROU - L'Hostis et Jorde, deal sup e lec'h
18, 27, Strad Louis-Pasteur - BREST R. C. 144

Pa ho pere eus des bennak da breza, dalc'ht sonj er so an hon ti e karoc'h al ar roua da pouz sag an trezou nevez e mouchoueroù ha lavanchouoù brodet. *Sant, mestr ha douer a hep vant.*

Dreist doue ar marc'hadouere an toumañ a vezz gwelloc'h-marc'had eget n'euz l'oc pehini holl.

Eus ekemp a agent real dre gant a vez rest e marc'hadouere ha dek dre gant e ar familhoù nevez.

GARAGE CENTRAL

DU RUSQUEC et C^{ie}
17, Strad Jean Jaurès, BREST - Téléph. 0-51

Conversion ar motokou

DONNET - DELAGE
CHENARD-WALCKER - ROCHET-SCHNEIDER

Les 7 CV Chenard-Walcker et Donnet sont des voitures économiques, élégantes et répondant à tous les besoins.

Stock Michelin

Labouradeg stummet eus ar gwella evid soza mat ha buan an holl girti dre dan

Ar c'hritri chomet a-raok m'eur an hent a vez distac'het ganeomp unur ar tui hag ar gouelou

Quincaillerie HAUTIN

(Maison fondée en 1880)

Louis BERTHELOT

SUCCESSEUR

102, rue Jean Jaurès et rue Saint-Martin

Téléphone 1-85 BREST (FINISTÈRE) R. C. Brest 9348

Grand choix d'appareils de Chauffage

Articles de Ménage - Éclairage - Articles de Bâtiment

Toiles cirées et Nappes

Stal-labour karonterez. Dibrezet ha liverez

R. C. Brest 252

Frédéric LAURENT

23, 25, 27, Strad an Tour d'Avrergne - LANDERNE

An itron intañvez LAURENT ager e lec'h

Dreist evid ar gwetrion sklav war rojou kerc'het-gom. Roue-kerc'het-gom a bep saer. Ar rojou kerc'het-gom a vez lakaet ganeomp da rojou kerc'het-gom.

FEIZ HA BREIZ

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU
Benet gant Y.-V. PERROT

ROUMARZHOE. — Breiz: 13 lur er bloaz. Erans ha broioù stag oute: 15 lur. — Diavaez bro: 20 lur. Skriba da: F. GOUZON, administrateur, 4, rue du Château, Brest. — C/O 4410 Rennes.

TAOLENN AR MIZ

FEIZ HA BREIZ, p. 233. — Kon ar Pelligent, J. ER BAYON, p. 237. — Khemmou al labourer divroet, J. L'H., p. 238. — Mikael an Nobletz, J. U., p. 240. — Santez Katal, p. 242. — Itron Varia Wir-Zakour, G. P., p. 243. — Kenta kentel ar barz yaouank, J. K., p. 247. — Eür ger diwarbenn ar skolioù, J. U., p. 248. — Labour-donar, O. CHIVILLOTTE, p. 249. — Noz Nedeleg e 1794, p. 251.

SULIOU HA GOUELIOU AR MIZ

4^a a viz Kerzu. — Eil sul an Avest. Ofereñn ha gousperou ar sul-ze.
8^a a viz Kerzu. — Ar Werc'hez kronet dinann. Gouel devoision.
11^a a viz Kerzu. — Trede sul an Avest. Ofereñn ar sul-ze. Gousperou kenta sant Kaourintin, eskol Kemper.
18^a a viz Kerzu. — Pevar sul an Avest. Ober a raer hizio gouel sant Kaourintin, d'an ofereñn-bred ha d'ar gousperou.
24^a a viz Kerzu. — Yon ar Mabilig.
25^a a viz Kerzu. — Gintvelez ar Mabilig Jezuz.
02^a a viz Kerzu. — Sant Stephan, kenta merzer, Gouel devoision.

FEIZ HA BREIZ (1)

O Breiz, donar ar zent koz, donar ar Varzed,
N'euz bro all a garan kement barz ar bed.

O Breiz, donar ar zent koz, donar ar Varzed,
N'euz bro all a garan kement barz ar bed.

Va Breudeur,

Douar ar zent, douar ar Varzed, setu petra eo bet Breiz-Izel gwechall, setu petra a dle chom, unanet e kaloune he bugale, karantez Doue ha karantez ar vro gant he gizioù kær hag ar yez santel o deus komzet o zadou koz.

Komzet hon eus, er miltin-man, eus ar Feiz; goulenet em eus ouzoc'h lakat poan da rei d'ez, epad an deiz-man a bedenn, eun nerz nevez, rak ne vefe'ch ket gwir Vreiziz, ma ne vije ket an ho kalon eur Feiz hec. Evit gouarn ar feiz, gouarnomp karantez 'vit hor bro gant he gizioù ha dreist holl gant he yez, rak dillo e vo nac'her e Zoue an hini a zo nac'her e vro. — Feiz ha Breiz a zo dion c'hoar.

I. — Feiz ha Breiz a zo dion c'hoar; e dispartia a ve o gwannat o diou ha lies mat o lara. Gouzout mat a reont kement-se, ar re a'n deus er bed-man, lavaret e vefe, nemed eur vicher: mouga ar Feiz e kement lec'h m'her c'havont; evit dont abenn eus o labour fall, int a en em gener, da genta penn, ouz ar yez; int a sko er galon, rak kalon ar vro eo ar yez a gomz he bugale hag o deus komzet o zadou koz.

Setu ouzpen 20 vloaz tremenet, eun nac'her, Komb a veze graet anezan, a lakas en e benn distruja ar c'hredennou santel en doa hen nac'het. Goude beza skarzet ar c'hrouventjou, forhanet menech ha loanezed, hen a daolas pled war hor bro. Poan a rae d'ezan gwelet e Breiz-Izel eur

(1) Prezegenn graet gant an A. Breuce, e Retred ar Mlean-Breiz, d'ar 14 a viz Gwengolo warlene. Ar brezegenn war Feiz a gavo'c'h e Feiz ha Breiz miz gwengolo diweza p. 176.

Daer er sent, daer er varhed, chetu petra e bet Breiz Izel gwechall, setu petra a dle chom unanet e kaloune, he bugale karante Doue ha karante er vro get he hizio kær hag er ieh santel en des komzet ou zadou koz.

Komzet hun es, er miltin-man, ag er Fe; goulenet em es genoh lakat poen de breiz delia, epad en de-men a beden, un nerh neñ, rak ne vebek ket gur Breizhis, pe ne veb' ket en ou kalon ur Fe biu. Aweit gouarn er fe, gouarnomp karante doh hun bro get he hizio ha dreist ol get he ieh, rak fonapl e vou renavi d'e Zoue en hani e zou renavi d'e vro. — Fe ha Breiz e zou diu hoer.

I. — Fe ha Breiz e zou diu hoer; ou disparti e veb' ou gouarnat ou diu ha lies mat ou labein. Gout mat e hant kement-se, er re n'en des er bed-man, hanval e veb' e, mameit ur veb'her; mougein er Fe e kement lec'h m'he havant; aweit donet de ben ag ou fal labour, ind em gener, de getan pen, doh er ieh; ind e skoer er galon, rak kalon ar vro e zou er ieh e gonz he bugale hag en des komzet ou zadou koz.

Chetu open 20 vlo tremenet, ur renavi, Komb e ne gweit anezan, e lakas en e benn distruja er hredennou santel en doe ean nahet. Arleñ en devout skarhet er hovandou, forhanet menech ha lannezi, ean e daulas e spi ar hun bro. Poen e bre dehon goulet e Breiz-Izel ur fe ken krii ha

feiz ker krenn ha ker sonn, ha setu ma tigeuzas en deiz, gand ar hersoned hag ar veleien, ar gourc'henned da brezeg e galleg; komz brezo- neg a oa difennet grous.

Petra ray ar veleien? Va breudeur, ar Vretoned ne bleigont ket. — D'ar zul warlerc'h, yez ar vro a zasonas krenfoch' eget hiskoaz e ilizou Breiz-Izel. Ar veleien o doa komprenet penaos ar peiz a venne an nacher diskar n'eo ket henkin yez ar vro oa, met ivez karantez Doue ha feiz hor gourdadou.

Feiz ha Breiz a zo diou c'hoar... Piou a glask, va breudeur, diskar yez ar vro, ar yez santel o deus komzet sent brudet Breiz-Izel, ar yez santel he deus komzet santez Anna, ar yez santel he deus douget d'an neun, a rumad da rumad, pedennou ar Vretoned? Pion? An diazevidi; ar Vretoned a nac'h o Breiz; an dud difeiz!

E pe seurt skolioù e klasker disch'wizienna a galon ar c'hrouadur ar spered breizad? Er skolioù digristen. Gouzout mat a raer aze penaos Feiz ha Breiz a zo diou c'hoar; gouzout mat a raer penaos laza unan a zo laza eben. Plijet gant Doue ha gant santez Anna rei kement-se da n'out splann d'ar vistri kristen a c'hellfe beza faziet war eun hent fall.

Feiz ha Breiz a zo diou c'hoar. — Va breudeur, mar plij ganeoc'h, deuit da ober eun dro vale, gand ar misioner en deus ar blijadur da brezeg d'eoec'h, dre ar parrezioù en deus gwelet abaoe 13 vloaz. — Setu an Argoad gand e godon didrouz, gand e draoniennou klouar, gand e lanneier melkonius hag e zouarou frouezus ma kresk enno an trevad; setu an Arvor gand e devennou, gand e reier, gand e enezennou, gand e vor glas a zav e reier, gand e abardaez, evit luskellet Breiz-Izel. Du-hont ha du-man ni a gavo parrezioù santel, parrezioù kristen eman beo enno feiz hor gourdadou; d'eoamp en iliz evid eur mision, eur retreat, d'eoamp da danva

douster an overennou en eur chapel eur chapelig didrouz, e mezu Breiz-Izel!

D'eoamp e tiegehu lugale ar zent. Aze n'eo ket kollet c'hoaz ar gizioù koz. Aze e komzer, e peder e komz ar Vretoned. Aze ar spered breizad a zo beo ha yaec'h evel ar feiz.

Du-man ha du-hont, e kavan, parrezioù a zo di- verket o nno eus a doue ar parrezioù a feiz krenn; parrezioù e reseo enno, meur a wech, ar misioner, lizeri hir, skrivet e galleg fall, evit tamall d'ezan ar prezegennou brezoneg en deus graet; evid ar parrezioù-ze ar gizioù koz a zo re goz. Met, va breudeur, klaskit ar feiz! Ma teuit c'hoaz a-benn d'he c'haout, c'houi a welo ez eo ken fruilhek hag ar galleg a gomzer. Ar gizioù koz, ar yez, ar spered breizad a zo aet kuit; ar Feiz a zo gwannet ma neo ket maro; kement-se hag heñ a zo ar pem kaos da gement-man? Ne vennan ket hel lavaret, met beza ez eus eun dra ha ne c'hell ket nac'h eun den hag en deus daoulagad evit gwelet: — ar parrezioù m'eman ar Feiz o vont war wannat enno, ar parrezioù ma 'z eus, en iliz, da zul, kement a lec'hioù goullou, ar parrezioù ma

ken sonn, ha chetu arriù un dé, get er personned hag er véleian, er gourc'henned da brezeg e galleg; komz breton e oé diluennet grous.

Petra lere er véleian? Mem bredér, er Vretoned ne bléigant ket. — Er sul arlerc'h ié h er vro e zasonas kriúoh aveit hiskoah e ilizieu Breih-Izel. Er véleian en doé konprenet penaus er peh e venné er renavi diskar ne oé ket henbin ié h er vro, mes eúé karanté Doué ha fé hun gourdadeu.

Fé ha Breih e zou diú hoér... Piú e glask, mem bredér, diskar ié h er vro, er ié h santel en des konzet sent brudet Breiz-Izel, er ié h santel en des konzet santé Anna, er ié h santel en des douget d'en néan, a rumad de rumad, pedennou er Vretoned? Pú? En dianvezierion; er Vretoned renavi; en dud difé!

E peh skolioù e anstér dihouriennein a galon er hroédur er spered breton? Er skolioù digrechen. Gout mat e hrér azé penaus Fé ha Breih e zou diú hoér; gout mat e hrér penaus laheñ unan e zou laheñ an aral. Plijet get Daé ha get Santé Anna hreñ kement-sé d'hanneñ splann d'er vistr kreench e helheñ marsé louf fariet ar er fal hent.

Fé ha Breih e zou diú hoér. — Mem bredér, mar plij genoh, deit d'hober un dro balé, get er misioner en des er blijadur da brezeg d'oh, dre er parrezioù en des gwelet a hoadé 13 vlé. — Chetu en Argoad get e goeden didrouz, get e flangennou kloar, get e lanneier melkonius hag e douerou frehus ma kresk enné er blié; chetu en Arvor get e deleneu, get e rehiér, get e mizennou, get e vor glas e saú e vóch d'anderú noz aveit luehennat Breih-Izel. Du-hont ha dumen ni e gavou parrezioù santel, parrezioù kreench e ma bliú enné fé hun gourdadeu; damb én iliz aveit ur mision, ur retreat, damb da danot.

Douster en overeneu en ur chapel Ur chapelig didrouz e mézeu Breih-Izel.

Damb e tiegehu lugale er sent. Azé er modou koh nen dint ket hoah kollet. Azé e konzér, e pedér e ié h er Vretoned. Azé er spered breton e zou bliú ha iah el er fé.

Du-hont ha dumen, me gav parrezioù e zou diverchet ou hanú a vesk er parrezioù gredus; er parrezioù e reseñ mar a huéh er misioner llié- rieu hir, skrivit en ur fal galleg, aveit temal dehou er predegeu breton en des groeit; aveit er parrezioù sé er modou koh e zou ré goh. Mes, mem bredér, klasket er fé! Mar det hoah de hen ag hé haveñ, hui e hédou e ma ken fruilhek el er galleg e gonzer. Er modou koh, er ié h, er spered breton e zou oéit kuit, er Fé en des goumeit ma nen dé ket maro; kement-sé ha ean e zou er pen kaos da gement-men? Ne vennan ket er laret, mes bout e zou un dra ne hel ket naheñ un den en des deulegad aveit guélet: — er parrezioù mem dé er Fé e monet ar hoannet enné, er parrezioù ma zou én iliz, dér sul, kement a lehiou goull, er parrezioù ma kaver enné er modou

kaver enno ar gizioù divergent deuet a ziavéz bro, eo ar parrezioù a zo tri war ar galleg. Sellet em eus en dro d'in, alies a-walc'h gant melkoni; gwelet em eus gant va daoulagad a Vreizad hag a vela; war gement-se, n'em eus aoun ebet, den n'am dislavaro!

II. — Fé ha Breiz a zo diou c'hoar. Va breudeur, lavaret em eus alies a-walc'h an dra-ze; m'hel lavar ha m'hel lavaro. Pa zilezer ar gizioù breizad, ar yez da genta penn, en eur barrez, ne 'z oent ket kuit o-unan kaer.

Deuit war va lere'h da unan hennak eus ar parrezioù-ze ha n'eman ket mui enno ken an hevelep yez, an hevelep spered hag an hevelep kalon ha gwechall.

Setu ni en eun tiegez a oa gwechall eun tiegez kristen. — Petra, va breudeur, a ra eun tiegez kristen? ar bedenn ha, dreist pep tra, ar bedenn lavaret war eun dro gand an holl. En tiegez-se, war mezu Breiz-Izel, holl dud an ti, an tad koz hag ar c'hrouadur dister, a en em vodo, a grouzto o diaouarn, hag a bede, holl war eun dro, kent kemeret o diskuiz.

En deiz hizio, an tad koz, an tad, ar vamm hag ar vugale ne gomzont ket mui an hevelep yez; galleg a zo desket d'ar c'hrouadur; red e oa ober evel ar re all! Penaos e vennit c'houi ma vo lavaret ar bedenn, war eun dro, evel gwechall? Peb unan, diouz e dia, a lavar e bater, betek an deiz ma vo ankounac'het da vat. En tiegez-se ne beder ket mui evel gwechall, hag hen a zo atao, evel gwechall, eun tiegez kristen? Ar garantez evid ar vro hag evit he yez a zo aet kuit; n'eo ket aet, gand he hent, he-unan kaer.

Setu ni en iliz. Eman an Aotrou person er gador brezeg; e pe yez e prezego hen, e galleg pe e brezoneg? Ma komz e galleg, ar re goz a zo aze hag a zo al lodenn wella eus ar vandenn, ne glevint ket eur ger; kerkoulz e vefe d'ezan komz latin. — Ma komz brezoneg er hótred yaouank a zo aze a c'hemoego, a stanko o diskoarn; ar vugale o deus desket o c'hatekiz e galleg ne gomprenint netra.

E pe yez e prezego hen? Paourkez person!! Da genta penn en deus klasket, o prezeg e galleg hag e brezoneg, rei d'he holl vugale magadur ar spered; met kent pell, hen a skuizo dirak bolontez fall eun toullad penou foll hag aveit.

Eman an Aotrou person er gador-brezeg; se- leuoamp; komz a ra e galleg... Allas, e pe doar e kouezo hadenn santel ar vrisioez! An hent a zo digor d'an diouiziegezh ha d'an denvalljenn. — Ar garantez evid ar vro hag he yez santel a zo aet kuit; n'eo ket aet, gand he hent, he-unan kaer.

Taolomp eur zell war ar barrez. — Yez ar vro a zo aet kuit, ha, war eun dro ganti, ar gizioù koz. Ne gomzer ket mui a vrezoneg; ne vennan ket dougen ken, ken nebeut, gwisksamant ar Vretoned kenavo d'ar c'houefou dantellek; kenavo d'an dillad kaer gand o voutouz ledan; paourkez Bretoned! yez Bro-C'hall a gomzont, evel e Bro-C'hall e vennont beza gwisket; mez o deus eus o bro. Sellit ar mere'hed yaouank; touzet o deus

divergont deit a véz bro, e zou er parrezioù-sé e zou é trocin d'er galleg. Sellét em es endro d'ein, liés mat get melkoni, guélet em es get mena deulegad a Vreizad hag a vela; a zivout kement-sé n'em es doujans erbet ma vou hanné e zel d'ém difari.

II. — Fé ha Breih e zou diú hoér. Mem bredér, laret em es liés mat kement-se, m'er las ha m'er larou. — Pen dé forhanet er hizieu breton, er ié h de getan pen, ag ur barrez, n'en dant ket kuit en unan gaer.

Deit ar me lere'h e unan hennak ag er parrezioù-sé e péhani n'en des chet mui, el guéharal, ur memb ié h, ur memb spered ag ur memb kalon.

Chetu ni en un tiegez e oé guéharal un tiegez kreench. — Petra, mem bredér, e hra un tiegez kreench? er bedenn hag, a drest pep tra, er bedenn laret ar un dro get en ol. — En tiegez-sé, guéharal, pe zisplegé en noz be mantel du ar mézeu Breih-Izel, rsh en dud ag en ti, en tad koh hag er hroédur distér, en un d'olé, e joenté ou dehora, hag e bedé ol ar un dro kent kemé ou repoz. — Hiniú en dé, en tad koh, en tad, er vamm hag er vugale ne gonzant ket mui er memb ié h; galleg e zou disket d'er hroédur, rekiz e oé gobér el er réral! Penaus e vennit hui ma vou laret er bedenn, ar un dro, el guéharal? peh unan e lar e bater a kosté, betag en dé ma vou ankochéit aveit mat. — En tiegez-sé ne bedér ket mui el guéharal ha éan e zou atao, el guéharal, un tiegez kreench? Er garantez doh er vro ha doh hé ié h e zou oéit kuit; n'en dé ket oéit en he unan gaer.

Chetu ni en iliz. — E ma en Eutru person er gador brezeg; e peh ié h e predeget éan, galleg pé breton? Mar komz e galleg, er ré goh e zou aze, hag e zou er lodenn guellan ag er vanden, ne glevint ket ur gir; kerkoulz e vefe dehou honz latin. — Mar komz breton, er bautred iouank, hag a drest ol, er merhed iouank e zou ezé e brei hégu, e stankou o diskoarn; er vugale en des disket ou katechim e galleg ne gomprenint nitra. E peh ié h e predeget éan? Peurkeñ person!!

De getan pen anstét en des, e predeget e galleg hag e breton, rein de ol e vugale magadur er spered; mes kent pé éan e chuehou dirak fal volenté un tolpad penne fol ha aúelet.

E ma en Eutru person er gadoer brezeg; che- leuamb; komz e hra e galleg... Allas, e peh doar e koehou haden santel er huiritioe! En hent e zou digor d'en diougezh, d'en hótreded. — Er garantez doh er vro doh hé ié h santel e zou seil hui... nen dé ket oéit get hé hent éñ hé unan gaer.

Taoulamb ur sel ar er barrez. — Ié h e vro e zou oéit kuit, hag, ar un dro get, er modou koh. Ne gomzer ket mui brehoneg, ne venné ket mui eúé goarn guskemant er Vretoned. Kenavo d'er houfeu dantellek; kenavo d'en dillad kaer get ou velouz ledan; peurkeñ Bretoned! ié h er vro gal e gonzant, el er vro gal e vennant bout gusket; méh ou des ag ou bro. Sellit er merhed iouank; touzet ou des ou bleu; chet ind hanter nué; un lam

o bleo; setu int hanter noaz; eun tamm danvez boketek taolet war o diskoaz; eun tamm danvez henvel ouz an hini a c'hroune gwechall gweleou hon tud koz. O daouarn, hizio en deiz, a zo mar-teze gwennoc'h ha flouroc'h eget daouarn ar mer-c'hed yaouank a-wechall, met, va breudeur o c'halon hag hen a zo ker glan ha ker kaer! Ar gziou-ze ne dalvezont netra da greski ar feiz.

Ne gomzer ket mui a vrezonég; ne vennet ket mui, ken nebet, en em zidui evel ma rae ar Vretoned a-wechall. E lec'h soniou breizad, ker c'houek ha ker brao, klevit ar soniou gallek ha, siouas, n'eo ket ar re vras eo a zo bet digaset d'hor bro; ailes mat, c'hoant am eus da lavaret, al liesa, ne glevet emmo nemet kouzou hag a zaotr ar c'henou o lavar hag an diskoarn o selaou. — Kement-se ne dalv netra da viret ha da greski ar feiz en hor bro!

Gwechall pa zeue daou Vreizad yaouank d'en em unani evid ar vuhez, dre liammoù an eured kristen, int a bede bepred d'ar banked, teir vrezad-ze: an onestiz, ar reizted hag ar gompartmentant vat. — E lec'hioù hag a anavezant mat hag a zo o trei ouz ar galleg, e kaver penaos an teir vrezad-ze a zo breman re goz; pedet e vezont da jom er ger. Re goz ivez an dansou kaer a veze graet gwechall ouz mouez ar binioù hag ar bombard, dindan splander an heol, dirak an holl. Er «salle de bal» e vez graet an traou, hizio en deiz; aze e vez danset etre peder moger, epad nozvezioù a-bez, dansou nevez, ha klevet em eus lavaret penaos, el lec'hioù-se, e weler bepred, e fresk an dud yaouank bodet, diou zanserez: an divergantiz hag an hudurnez. Ar gziou breizad a zo aet kuit ha kement-se n'eo ket talvezet da netra evid kreski ha miret ar Feiz hag an onestiz en hor bro!

El lec'hioù m'eo aet kuit ar gziou koz ar gziou nevez o deus kemeret o lec'h, ha saotret pep tra... saotret o deus betek an enframmanchoù. E pe seurt parrezioù e chomer e tal dor an iliz epad servich hag ofrenn? E pe seurt parrezioù e klevet a-drenv [al laouer] an arched a zouger d'ar vered divizoù trouzous kentoc'h eget pedennou? N'eo ket red d'in hel lavaret d'eoec'h; digorit ho taoulagad hag her gweloc'h.

Dre an nor, digoret a dammigoù, ar garantet evid Breiz, evid he vez, evid he gziou koz a zo aet kuit; pa 'z eo bet digoret, en he lamm, na pehez traou diskempenn a zo deuet en o lec'h!! Treitourien d'o Doue, treitourien d'o bro ar re o deus he digoret.

Breiz, douar ar zent koz, douar ar varzed... Stank int c'hoaz ar re ho kar a greiz kalon; ar re a zo aman ouz va selaou a zo eus ar re-ze. — Plijet gant santez Anna a zo aman he relegou ma ho karint muioc'h-mui, rak ouz ho karet muioc'h mui, muioc'h-mui e karint o Doue.

Evelse bezet graet.



dañné boketek taolet ar ou diskoéc; un tam dañné hanval doh en hani e hronné gucharal guleu hun tud koh. Ou dehorn, hiniù en dé, e zou marse guennoh ha flouroh eit dehorn er merhed iouank a hucharal, mes, mem breder, ou halon ha éan e zou ker glan ha ker kaer ? Er modeu-sé n'en dint ket aveit kreskein er fé.

Ne gomzer ket mui brehoneg; ne vennet ket mui un ziverbis el mar er groe er Vretoned a hucharal. E lèh sonneu breton ken dous ha ker braù, klevet er sommenù gallek, hag ailes, nen de ket er ré vrasan e zou bet digaset d'hor bro; lies mat, hoant em es de laret, er liesan, ne glevet enné namet kouzeu e gousi er hég ou lar hag en diskoarn ou cheleu. — Kement-se n'en dé ket aveit goarn ha kreskein er Fé en hun bro !

Gñeharal pen dé deu Vrethad iouank d'un joentein aveit er vuhé, dré liameu en éred krechen, ind e gouvié berpet d'er chervad ter vrehad-ze; an onestiz, er reizted hag er gomportemant vat. — E lèchieu e hamantan mat hag e zou é troein d'er galleg é kavé penaos en ter Vrethad-ze e zou breman ré goh; kouvié int de chom ér ger. — Ré goh euc é krollou kaer e oc groeit gucharal doh boé er binieu hag er bombard, édan splandér en hiant, dirak en ol. Er «salle de bal» e vé groeit en treu, hiniù en dé; azé e vé krollé étré peder magoér, épad nozieu a-bèh, krollou neué, ha kleuet em es laret penaos ér lèchieu-sé e huéler berpet, emesk en dud iouank talpet, dui gorolez: en divergantiz hag er baillardégéh. — Er hustumeu breton e zou oeit kuit ha kement-se n'en dé ket aveit kreskein ha goarn er Fé hag en onestiz en ur bro...!

Er lèchieu n'en dé oeit kuit er modeu koh, er modeu neué en des kemeret ou lèh, en des kousiet pep tra... kousiet ou des betag en intermanteu. — E peh parrezieu e chomer étal dor en iliz épad chervij hag overen? E peh parrezieu e klevet ar dran er leur e zouger d'er vered divizioù trouzous kentoh aveit pedenneu? N'en dé ket rekiz d'ein er laret doh; digoret hou teulegad ha lui e huélu. Dre en nor, digoret a dammigen, er garanté doh Breih, doh hé lèh, doh hé modeu koh e zou oeit kuit; pen dé bet digoret, en he lamm, pé sort treu diskonfort e zou deit en ou lèh!! Treitourion d'ou Doué, treitourion d'ou bro er ré en des hi digoret !

« Breiz, douar ar sent koz, douar ar varzed ... Stank int hoah er ré hou kar a greiz kalon; er ré e zou aman doh me chedélet e zou ag er ré-se. — Plijet get Santez Anna e zou aman hé relégu ma hou kareint muioc'h mui, rak doh hou karein muioc'h mui, muioc'h mui e kareint ou Doué.

Evelsé re vou groeit.

Kan ar Pellgent

Ton savet gant an A. Mayet.

Pep trouz dre holl A zo deut da gouez - za, An a-vel foll a
 ha-ouez da c'hone - za; Kaer e-vel ar gliz mae A gouez var vleun ar
 chae, Je - zuz zo dis-ken-net: War blouz ar c'hraou, hep fac, se - tu Hen as-ten - net!

I

Pep trouz dre holl
 A zo deut da goueza;
 An avel foll
 A haouez da c'houeza;
 Kaer evel ar gliz mae
 A gouez war vleun ar c'hae,
 Jezuz 'zo diskennet:
 War blouz ar c'hraou, hep fac,
 Setu Hen astennet.

II

Eur vamm zeder
 A vir en e gavel
 E gorf tener
 Diouz flemm yut an avel;
 Netra kaeroc'h n'eo bet,
 Gwelet biskoaz er hed,
 Eged ar Mabig flamm
 A weler, en e sked,
 Gant ar Werc'hez, e Vamm.

III

An elez c'hlan
 Holl a-unan ha krenv
 Er vamm, a gan
 Meuleudi Mab an nenv:
 Tud an uhennou,
 A red, a vandennou,
 Da wetel ar Mab gan
 Hervez gourc'hemennou
 An Elez, en o c'han.

IV

D'ar Rouaned
 Eur steredenn a flamm,
 Dal m'eo ganet
 Ar Mabig gand e Vamm,
 Hag i gant feiz ha mall
 O wetel kement all
 A red da glask Doue
 A dec'h diouz pep hent fall,
 Hag a gav o Roue.

I

Ar plouz ur hreu
 Ur hreu ien ha digor
 D'en atèlieu,
 Hemb lukan hag hemb dor,
 Ag en néan dichennet
 Jezus e zou gainet.
 Kaer èl ur bar è bleù
 Chetu can astennet
 Ar plouz ur peur kèh kreu.

II

Ur vam tinèr
 En dalh ar hé barlen
 Ha, get dous-ter.
 Dousig hi er luchen.
 Nitra kaeroc'h ér hed
 Ne hel ket bout guelel
 Eit er hroedur distèr
 Er hreu-sé luchenet
 Dré é vammig tinèr.

III

Eled en néan
 En noz-hont e ganné
 Ou han kaeran
 E'n inour de Vab-Doué.
 En dud ag er mézeu
 E zeuhlina é hreu
 Dirag er hroedur glan
 Revé gourheméneu
 En Eled ag en néan

IV

Rouané en doar,
 E héli er steren
 Deit hemb arvar,
 E gav en o fen
 Er hroedur e glaskant.
 En hamet e hant
 Aveit ar Roué henn par
 Ha, get fé, é stouiant,
 Er Rouané ag en doar.

J. ER BAYON.

KLEMMOU AL LABOURER DIVROET

Gwerz kurunet e Bleun-Brug Keranna

I

Siouaz, petra am eus me graet,
O pellaat diouz va Bro garet?
Petra 'm eus graet, o tilezel
Va Bro hep par, va Breiz-Izel?
Eno, en eun draonienn didrous,
En eun ti kuzel er brug rous,
Eno, pell diouz dispac'h ar bed,
Tregont vloaz 'zo ganet oun bet,
Eno, kan flour ar wagenn c'hilas
Va c'henta kousk a luskellas,
Yudadenn ar barrou-arnec,
Eno, d'an noz, am dihune,
El liorz kloz, d'an hanv laouen,
Son an costig a zelaouen,
Ha, diare'hen, er prajou gwer,
E korollen war lez ar sterc,
E troad ar c'harz, d'ar mizioù gor,
E kutuilhen ar bleun digor,
D'an deizioù yen, joa a gaven
O riza war gein an aven,
Em diou-skouarn hag em envor
Eo beo c'hoaz klemm moriou Arvor
Ha kleier Breiz, a-dreuz kant leo,
A zigas d'in c'hoaz o hegleo,
Montez skilt ar vombar, d'an eured,
Montez kaonv ar person, er vered,
Montez an denved, war ar peurvan,
Holl vouezioù va bro a glevan.

II

Siouaz, petra am eus me graet,
O pellaat diouz va Bro garet?
Petra 'm eus graet, o tilezel
Va Bro hep par, va Breiz-Izel?
Sioul hag alaf evel eun oan,
D'ar c'henta komz sentus e oan,
Ha va mamm d'in, war he barlenn,
Hep poan ebet, a zeskas lenn,
Ato war zao, da c'houlou de,
Kevred, an liad a bede,
Bennoz-a-raok mont da c'hourvez,
E pedemp Doue a-nevez,
Meur a vreur, meur a c'hoar em boa,
Seul-vui a dud, seul-vui a joa,
Ha va zad d'eomp a lavare:
A vleun, en ti, morse n'eus re,
Dister e oa hor peadra,
Hor c'houezenn a roe d'eomp bara,
Ha, gant va zad, c'hoaz paotrik krenn,
En douarou e labouren,
D'an iliz ez eamp d'ar zuliou,
Ni gave eno kuzulioù
Ha komzou fur ar prezeger
Hon heulie, goudeze, d'ar ger,
Va yez a oa hini va Bro,
Yac'h e oan evel hon dero,
Gouestad e vleunie va c'halon...
Hirio, oun troet da halhonn.

III

Krena a ra va muzellou,
War va dioujod e rullu daelou,
Pa zeu, war nij, doum em spered,
Ar zoloni vras em eus graet,
Eun deiz eta, deiz a anken,
E krogas ar soul fall ennoñ,
N'hen ankoumae'hañ birviken,
Da vont e ker gand eur mignoin,
Skuz e oan gand va labour tenn
Ha, diouz lavar eur gazetenn,
E ker, em hefe deizioù berr
Ha nebeut a dra da ober,
Ar goustians, ken rust pa lemm,
Am lage gand rebechou lemm,
Ha va c'herent, ken mat ato,
Va aspede da jom ganlo,
Strobinellet gand va bunvre
Da veva pelloc'h diere,
E kasen kuit diwar va zro
Montez va Doue ha mouez va Bro,
Da zeiz ar c'himiad, eur zadorn,
Va zad paour a stardas va dorn,
Met, astennet war he guele,
Va mamm vat dourek a ouele,
Hogen, hon daou, da galamae,
E tec'hemp, eur c'henec'h ha me,
Hag ar more'hed, gand e girell,
A dreuze traitour Breiz-Izel.

IV

Siouaz, petra am eus me graet,
O pellaat diouz va Bro garet?
Petra 'm eus graet, o tilezel
Va Bro hep par, va Breiz-Izel?
D'al lun da noz, wardro nav eur,
E oamp e Pariz, ar ger-veur,
Hag ez aen, gand va c'hamarat,
War al linon da labourat,
C'houitell raoulet an hent houarn
Bemdez a roge va skouarn
Hag e kaven e oa kaeroc'h
Klemvan ar wagenn war ar roc'h,
Ar march du a sileje an tren
A granche glou da heul poul'tren
Ha va zont a rede d'an od
Ken fresk e hanal ouz va jod,
Tud a bep yez, tud a bep bro
A welen e lec'hioù war-dro,
Met, siouaz, pebez krenm etre
Lavarou Breiz hag o re,
Divizou lik, komzou hudur
A zistalont gand piljadur
Hag, a-wechou, da jench c'hoari,
O zeot a zaotre ar vistri,
Eur gopr mat a-wale'h, hep sadorn,
Hep mank, a leunie d'in va dorn,
Buan e teuze, rag e ker
Dibri hag eva a goust ker.

V

Va lojeiz a oa eur gamb striz,
Na pebez mez evit Pariz;
Hag eur zell war va gwele louz
A zave ennoñ keuz d'am flour,
Tremenet em eus daouzek vloaz,
E kreiz ar reuz, e mesk ar gloaz,
Korf hag ene ez oun brevet
Ha gwasket oun gand ar c'hlenved,
O va Breiz, bro gop an drouiz,
O douar benniget Breiz,
Ruz gand da vrug, gwenn gand da lann,
Etrezont bemdez e sellan,
Va Doue, ro d'in ar yec'hed,
Ma c'hellin prim ac'han tec'het,

Hag e Breiz klevout, er maezioù,
Kanaouenn lizin an neizioù,
Ma c'hellin, gand va daou ejenn,
Digeri irvi en dachenn
Ha d'an dourteuz adarre
Roi da lounka pennoù dare,
Ma c'hellin du-host a-nevez,
Mont da bedi, mont da govez,
Ha da japel santez Anna
Distrei, hep bleaz, da bardona,
Ma c'hellin erfin, hep dale,
Gwelet en dro d'in bugale,
Ha, pa zono va eur, em Bro,
E peoc'h digemer ar maro.

J. L'HELGOUACH,
O. M. I.



Pedenn ar Breizadig bihan d'ar Mabig Jezuz



Mabig Jezuz, ker kaer az kavan
M'az karan
Ha kement az karan
M'hel lavaran
D'it ha d'az Vamm
O mabig flamm!



MIKAEL AN NOBLETZ



Skrid arched plom Mikael an Nobletz

Cy gyst le corps de noble et vénérable Messire Michel Le Nobletz, d'honneur mémoire, en son vivant prestre et missionnaire apostolique de la Basse-Bretagne, lequel mourut au Couquet en odeur de sainteté le 3 may 1612 âgé de 75 ans, et en l'année 1701 Mousse et Pierre le Neveu de la Brosse, exesques et compte de Léon fist lire ces osses au lieu où il avoit esté enterré et les fist mettre en sa presençe dans ce cercueil de plomb qui fust ensuite pose sous un tombeau de marbre que la piété des fideles avoit fait construire à l'honneur de ce S^r Prestre le tout ayant esté préalablement communiqué à la congrégation des Rites

Burzudou all

N'oa ket ret mont da Zouarnenez pe da Dremenech pe da Gonk evit kaout grasou dre e'challoud Mikael an Nobletz. E zihand, e skeudennou, ar chapelodou a oa bet toucnet ouz e gorf, goude e varo, eur heñvenn, a oa awalc'h evit kaout grasou dreizan.

Eul leanez eus Kalvar Raouzon a voe paret diouz an dezienn o tougenp epad nao devez eun tamm eus soudanenn Mikael an Nobletz.

Perrin Fouquet, gwreg Bourlez, eus Sant Rivaal, a gollas he merc'h, oajet a 6 vloaz, dre eur barrad terzienn. Chouech eur a oa tremenet abaoe maro ar c'hroustour, hag eodou o vont d'zebelia. Neuze ar vamm en em doulas d'an daouin hag a bedas kalonek ar misioner santel : « Mikael an Nobletz, emei, servicher bras Doue, n'am eus bugel ul c'het; dalc'hit d'm va merc'hig, rak her gelout a rit. » — Pion a lavaro levezur ar vamm hag estlunam an dud a oa eno, pa voe gwelet ar vech'big o sevel hag o lavaret : « Me a jomo ganeoc'h, va mamun; pare onn ? »

Ar vartolodet, migoned Mikael an Nobletz, a zo bet ive meur a vech savetret dre e zikour. E kreiz ar barrouz-amzer e pedent Mikael d'o diwall, hag an avel, ar mor a gollie o chouarnar.

Anaoudegez ar Vretoned evit Mikael an Nobletz

Eur pennad mat a zo abaoe 1652, abaoe n'eo maro Mikael an Nobletz, met n'eo ket ha ne vezo ket ankounac'haet gand ar Vretoned. Tud Breiz a gar enori, mamm hepen o Sent kor, met ive an dud o deus, e doug ar c'hanvejou, grêt vad d'ezo.

Komet hor heus eus ar chapel savet e Douarnenez da enori sant Mikael Arc'hel, patron Mikael an Nobletz. Ar chapel a zo koant, bras a-walc'h, furm eur groaz d'ez; War eur maen e lenner ar geriou-man :

M^e H^e : Paillart : reet : de Ploaré.
Michel : Poullanec : Fabrique : 1664.

Brao ar ar chapel, ha kalz skeudennou enni. Hirio e chom choaz lod amez.

Kalz tud a zo bet o pedi e chapel sant Mikael. Eus pep korn a Vreiz e tredit, hag a-wechou d'ar pardon e veze betek dek mil den. An Tad Maner a veze ailes

oeh ober ar pardonouze. E 1664 e chomas epad miz mae penn da benn e Douarnenez. E 1665 e teuas adarre, hag endro d'ezan 40 misioner. Neuze eo e savas pardon sant Mikael. War e choulenn, an otrou Louet, eskob Kemper, a roas 40 devez indujanou da c'houit, epad miz mae ha da hep meurs eus ar bloaz, d'ar re a zeufe da bedi d'ar chapel, da gomunna, d'ar re a lakae eun ofercun. — Ar pab Alexandr VII a roas eun indujan plenier da c'houit d'ar zil kenta goude Mikael.

E miz mae 1665, p'edo eno an Tad Maner gand e vistr, misioner, e teuas d'ar c'hel-p'kant mil perchin; c'houezek mil a reas eur profesin jeneral, hag en eur devez, da zil an Drendred e voe 7.500 komunan.

E Tremañch (Plouene) e voe savet eur chapel all da zant Mikael Arc'hel e 1707, e kichen lod Mikael an Nobletz. Eur pardon bras ha kaer a vez eno d'ar zil devez a viz gwegnolo hag eun all, en enor d'ar Galon Zakr, d'ar pempvet sul goude ar Tantekou. Ar re o deus c'hoant da welet pardonlou santel, prossiounn kaer, n'o deus ken nemet mont da Plouene.

Absaveit eo bet lod Mikael an Nobletz e amzer an otrou Fave, person Plouene. D'an 21 a vezeven 1801, e teuas an otrou Lamarche, eskob Kemper, da vennig an ti nevez. *Il an otrou Mikael an Nobletz*, hag e voe eur goude bras meurbet. Kalz tud a ritetas, eus a heñ zoken.

E Konk, chapel Itron Varia-ar-Wir-Zikour a zo ato en he zav, ha kalz tud a vez eno o pedi, e *ti Vilzel an Nobletz*.

An Iliz parrez e lec'h bez e Lokrist a zo breman e Konk, eun iliz nevez, bras ha kaer, a zo bet savet eno er bloaz 1856-58. Ar vered a zo ato e Lokrist.

Relegou Mikael an Nobletz

Er-bloaz 1701, gand otre eskob Kastell, dirag eun niver bras a destou, heleien ha tud lik, e voe tennet korf Mikael an Nobletz eus hez an otrouneud Haignou ha lakret e bez otrou Moxionn, e keur iliz Lokrist, e tu an Aviel. Varnan e voe lakret ar bez marbr ker kaer a weler hirio e iliz Konk, varnan skeudenn Mikael doulinet o pedi. An draze a voe grêt d'ar zil, 26 a vezeven 1701. O deus sinet: Ambroaz Gall, beleg; F. Koe, beleg; A. du Mesang; Anna de Kergourla; Prigent Jozef Mikael de Kerony; Visant de Keroullaz; Gabriel Millon; Eleonora Jorliand; Anna, ha Mac'hari du Mesang.

E 1855, d'ar bemp a viz kerzu, p'edou o sevel iliz nevez Konk, e voe digoret ar bez adarre aronk kas ar relegou da gonk. An otrou Mercier, person sant Louz, Brest, an otrou Rivoalen, person Plouene; an otrou Le Roux, person Lokouran; an otrou Daniel Miorce de Keridant, alvokal, a voe karget eus al labour gand an otrou Sargent, eskob Kemper.

N'odont ket heb enket. Abaoe 1701 ez eo tremenet meur a vloaz. Ha chomet oa ar relegou e lec'h m'ont bet lakret?

Dirak kalz testou, heleien ha tud lik, e voe digoret ar bez. Dindan ar marbr e voe kavet eun arched plom, ha var an arched-se skeudenn ar misioner sehellet. O kas kuit ar boullrenn, e voe sellet lenn war an arched ar geriou-man. « Aman eo bet lakret korf an otrou Mikael an Nobletz, beleg ha misioner e Breiz-Izel, maro evel eur zant e Konk d'an 3 a veze 1622, d'an oad a 75 bloaz. An otrou Per Le Neveux de la Brosse, eskob Kastell, a roas urz e 1701 da denna an eskerman eus al lec'h m'ont bet da genta beziet, ha n'o likant an arched plouman dindan ar bez marbr savet evel enori ar beleg santel. Kennaduruz a zo bet kaset da Gongregasion al Lidou. »

Ar gojo plomn a oa soudet mat var an arched, ha siellet e pep korn.

E avriorez, n'oa ket da veza e entremar. Relegou Mikael an Nobletz a eno.

Met, ha n'ont ket deuet da veza poullr ha ludu? Rak

skrivet eo : « Dale'h sonj, den, out poullr, hag e distroi e poullr. »

An testou o doa' adarre eun tammig enkre o welet digeri an arched plom. Met lousen e vont o welet ar zant e jome eus ar c'horf; eur mared a eskern eus ar penn, an dioukoaz, an divre'h, an divreker, an diou-groazel. Al lieunen n'ont bet dastumet enni, gweñ gwechall, a oa breman meñ.

Ar relegou a voe anavezet lakeet en arched plom, hag a-nevez an arched a voe klozet, soudet ha siellet, kaset da genta da japel sant kristof ha da chonde d'an iliz nevez, pa voe peurbret. Eno emañ dindan ar bez marbr.

Prosez evit Iakaz Mikael an Nobletz e renk an dud eurus

Adre ar bloaveziur ar Vretoned o deus kendalc'het da gredi eo Mikael an Nobletz eur zant ha da gaout f-zians ennan. E Douarnenez, e Konk, e Tremañch eo bet ato pedet.

En eul lizer d'an otrou Kerdanet (3 ebril 1832), skrivet gand an otrou du Chatelet, heman a lavar pebra, epad ar Revolution, kement hag nevez a veze grêt e Douarnenez, en he bezek kenta ez ae da steki eun otrou Konk, hag ar vartolodet, e eur vont, a gane kantou en enor d'o misioner koz. E Konk, e choulennet e vennoz.

Kendalc'het en deus heve-vreman da skuil grasou vad tud Douarnenez hag ar re holl o deus e bedet.

Abanavour da-ze ez eus c'hoant e ve lakret e renk an dud eurus.

E 1867, 130 beleg eus an eskopi, bodet e Kemper evel ar retred, a reas eur goullenn d'an otrou 'n eskob Sargent, evit ma veze grêt enklask var buhez, vertuzou ha burzud servicher bras Doue, Mikael an Nobletz. Met n'ez eas an traon var aronk nemet e 1888, en amzer an otrou Lamarche, eskob. Neuze eo e voe hanvet barnieren an eskopi karget d'ober an enklask.

Epad daou vloaz e labourjont o sellet piz ouz an holl skridou hag o seloun testi ar re holl a anavez eun dra bennek divarben Mikael an Nobletz. Eus a bep tu ar veteien, an dud lik a zeus da ziskleria o doa alio klevet lavaret eo Mikael an Nobletz eur zant, eo doa grêt hag a gentalc'he d'ober burzudou.

Er papeter kaset da Roum e weler testi an darn vras eus chaloniet an eskopi, testi personed Plouene, Konk, Douarnenez ha re all. Gwelomp ul lodenn eus an traou diskriet.

Setu amañ pebra lavar an otrou Keryella, bet kure e Plouene eun hanter-kant vloaz bennek. « Me a zo bet ganet er bloaz 1822; va zad a oa bet ganet e 1780. E glevet em eus meur a vech, p'oañ bihan, o konta d'm eo kement Mikael an Nobletz evel eur zant gand an holl e Plouene. Er c'hloardi bihan, er c'hloardi beas, er misioner, e kement lec'h m'ont bet, em eus ato klevet komz eus Mikael evel eus eur zant. » Hag e konte ar burd-ek vloaz bennek d'ezan, en doa em c'hoazet. E dad e gasas da gaout an otrou Morvan, medisin Lannilis, a lavaras edo krog an letanous ennan hag e tofe dizale ar maro d'ezan. Ar vamm a redas da feunteun Mikael Nobletz, e Tremañch, ha leun a f-zians, a roas da eva d'ar c'hlanvour eus an douze. Ar paotr a baras. Ar medisin a c'houlennas diganen eus e gelou divezetoc'h, hag a voe souezet o klevet eo pare, rak kredet a reas eo maro abaoe pel mizer. »

Arsoz an dra-ze, e Plouene ive, Goull'han Anguilern, glozet gouza divar varc'h, bet o kaout meur a vedesin hep beza gwelloc'h, ne c'helle mui labourat. Ober a reas le da vont da heñ da japel sant Mikael ha da gas eur gurenn. Adaleg an deizez e wellas ha dizale e c'hellas labourat.

Setu amañ burzudou all kontet gand eur beleg eus Plouene hag a zo he c'hoaz: Eur paotr, lakez ar Goff, ne c'helle ket bale ez viban, en em lakeas raktal da vale e chapel Tremañch, en deiz ma voe kaset di gand e gerent.

Eur plac'h yaouank, Jozefin Bars, deuet da veza leanez eus Urz ar Spered-Santel, a voe paret eus eur gwail

olenved, oc'h eva douz ker-c'het d'ez e feunteun Tremañch. Ar medisin, goullkoud, en doa diskriet n'oa pare ebet evit. Dre anaoudegez vat he deus kemeret an lano a Leanez Mikael-Mar.

An otrou Lamour, person Konk, en deus ive roet da anaout meur a vuzul:

Yann Gendrol, pesketer e Konk a voe paret e 1880 eus eur c'hlenved bras oc'h ober eun naved da Vikal an Nobletz.

E 1886, Louiza Pocheur, he dea droug-sant, a voe paret raktal o font da bedi da vez Mikael an Nobletz. Dimezi a reas daou pe dri bloaz goude, ha ne gouzas mui.

Eur yaouez eus a Bloumoger, gwreg ar Maze, klav bras hag a ditte mervel dizale hervez daou vedesin, a c'houlennas digant Mikael an Nobletz ar c'hras da jom c'hoaz eiz vloaz var an douar evit gelout sevel he bugale a oa d'ar mareze-ze yaouank. He goull e voe roet d'ez; sevel a reas he bugale, met eiz vloaz goude, deiz evit deiz, e vezas hag ar c'hlenved-se.

E Douarnenez Kristina Godec, intanzev Renot, a zisklerias ive heza bet grasou bras dre zikour Mikael an Nobletz; e 1891, 1892 he deus gwelet bugale d'ez o pebra en eun doure burzudous goude m'he doa pedi Mikael an Nobletz. Prometi a reas mont var droug eus Douarnenez betek Konk e pelerina da bedi e kichen bez Mikael, hag e veze selouet he fedennou.

E Enez Sun, d'ar 15 a cost 1899, eur paotr, Gwennole Milmer, tolet er mor gand em all, a zisklerias d'ar g'gletiet holl hag a gouzas klav. War mervel edo, pa voe grêt evitan eun naved da Vikal an Nobletz. Ker- kent e parsas.

Eus a bep tu e teuas tud da ziskleria o doa bet grasou bras goude pedi Mikael an Nobletz.

Ar varmerien karget eus ar prosez a zibabas ar pez a gavet kaera, hag e 1891 oa prest n'traou da gas da Roum. D'ar 6 a ebril 1897, ar Fab Leon Gili a roas aotre da aregi e prosez servicher enorus Doue, Mikael an Nobletz, beleg ha misioner.

An Iliz a gemer ato he amzer. Ober a ra enklask war-lerc'h enklask, sellet a ra piz ouz pep tra, ha ne lavar he ger diveza nemet goude hir amzer a-wechou. Evid santer Yann d'Arz ez eus bet raktal labourat epad ouzpen 30 vloaz. Evid santer Teresa ar Mabig Jezus eo aet buan an traou, rak amañ oa burzudou testiñt mat gand medesined, ha burzudou nevez c'hoarvezet.

N'eo ket a-walc'h diskleria en deus grêt Mikael an Nobletz burzudou. Roum a c'houlenn mekou skler, anat, testou gouziet. Burzudou Mikael an Nobletz a zo burzudou kaer meurbet, testiñt int bet gand tud poellic. Evedalo n'eo ket a-walc'h evit Roum, ma ne vez ket testi medesined da heñ.

Tetra zo d'ober? Setu amañ: Pa vezo eur c'hlanvour dare da vervel, dilazet gand ar vedesined, e erbedi eus Mikael an Nobletz gand feiz ha f-zians, ober evitan eun naved, eur pelerina da Dremenech pe da Gonk pe da Zouarnenez, ha ma ten da barso, mat raktal da c'houlenn testiñt ar vedesined o doa e welet.

Ha neuz, pedomp evit ma piljo gand Doue enori e zervicher santel. Anez ar bedenn ne c'heller nete. E 1913, Roum he deus diskriet eo bet miret ar vertuzioz gand Mikael an Nobletz eus eun doure-dreist. Ar bazenn genta eo evit beza savet e renk an dud eurus.

Ma vez eun deiz laketa Mikael an Nobletz e renk an dud eurus ha, da c'houde, e renk ar zent, e vezo levezur e d'ez ha gouellou kaer meurbet.

Met, ha goude ma vedemp maro aronk an deiz-ze, e c'hellomp kredi eman Mikael uhel savet e gloor ar Bar-raoiz. Den ne c'helle niveri ar re holl a zo er Bar-raoiz, eun nebeut hepen a zo lakret o hano gand an Iliz var Roll an dud eurus ha var Roll ar zent.

Dalc'omp koun ato eus ar c'hentellou en deus kost d'eo gouziet Mikael an Nobletz. Keromp dre an heñ diskouezet ganam. Gromp fae var bed, e vadou, e bihjadurez. Deskomp hor c'hateliz, hag hen deskomp d'ar vuigale. Keromp ar retrejiur ar misioner, tenomp hor mañ mezo. Dalc'omp d'hor feiz, hor brasa tenor, difennomp hor feiz ouz mevelien ar drouk-savet a glask he mouga, ha gromp gwella ma c'hellimp evit ma ne c'helle ket bale ez viban, en em lakeas raktal da vale e chapel Tremañch, en deiz ma voe kaset di gand e gerent.

Eur plac'h yaouank, Jozefin Bars, deuet da veza leanez eus Urz ar Spered-Santel, a voe paret eus eur gwail

Santez Katell ha Niccolo Toldo

BREMAN EZ EUS 550 YLOAZ. — Katell, (1347-1380), giniidik eus a Zienn, en Itali, unan eus a bemp krouadur war mignet Giacomo di Penicena, a varvas, gwerc'hez, d'he zri bloaz ha tregont, goude beza lazet kalc'h a viret da guezia war he ano hag etez a zantelezh da vleunia war he ene.

Ar seizet Pub, giniidik eus a Vro-Chall, a oa war gador sant Per, p'edo en he gant uella, hag hini anez, aboue ar bloaz 1305, n'oa bet a chom e Rom, gweleoc'h e oa ganto beza e Avignon; stonaz, epad an amzer-se, her-benn ar bed kristen a oa deuet kement a ziskar enni ma venne koueza eil he froll.

An aotrou Doue a sibabas Katell, eur vereh tregont bloaz, da vont da gavad, evel m'hel lezanve, e ar Christ war an douar, a oa Gregor XI e eno penze, de heil da zezri dia Rom; Gregor, goude beza kleset ar peh a lavare d'ezan merch bled ha d'e dal zoken hag a oa bez, hag e rankas lemmat dreit e gorf, eil mont er mez eus e balez, a guiteas An-ton d'an 13 a viz gwelego 1376, d'ar 17 a viz genne 1377, e oa digemet e Rom, e kreiz ar brasa chorion; Ennon e unan, e lavare neuz, diwarbenn Katell, ar peh a lavaro, diwezoc'h, a c'heno, ar pob Urben VI, e ar pladig-ze a ra mez d'omp holl!

Aboue Gregor XI n'ous bet pob gall ebet ken oeh atezia war gador sant Per.

Gand ar penad a lakomp aman e vevlec'h pebez halon, vat a vuozes he devoz santez Katell, eur santez hag a gare hon tud koz hag e lavare d'ezan o fenn: e Dreiziz a dremen atou dre gement toall ma tremen an heol!

Niccolo Toldo a oa eur skanv-lenn a baotr; graet en devoz eun taol fall ha lamet e oa da veza dibennet a daolliou bouc'h'al. Mont a rae anezan e-unan pa lavaret an d'ezan eus e varo ha gwall-gomz a rae eus an Aotrou Doue. Katell a deuas da glevet e pe setu edo hag ez eas d'e welet en e brizon ha setu aman petra skriva, goude ar maro, da Raymond a Gapoua, he c'hoesour:

« Bet ouz o welet an hini em eus lavaret ano anezan d'eoeh, kentoc'h, ha ker frealzet ha ker laouenaet eo bet ouz va guelel ma en deus asan-tet kovez. Goulnenn en deus ouzin rei va ger d'ezan da jom en e gichen da eur e varo ha graet em eus evel m'en oa lavaret. Diouz ar beure, a-raok an taol kloc'h kenta, oun aet d'e gaout ha raktal e voe laouenaet holl. Her c'has a ris da glevet an ofereann. Komunia a eure, ar peh n'en doa ket graet biskoaz. Soubla a rae e youl da youl Doue; aoun en doa hepken na vije ket mestr a-walc'h d'ezan e-unan p'en em gavje eur ar c'has-tiz hag e lavare d'in: e Gand a ri, chom gansen, ha n'ez ket d'ann dilezel ha neuz ez ay mat an traou hag e varvin laouen! » Hag e tiskriva e galon war va hini. Neuz e klevis evel c'houez vat gard e wad a oa evel toueziet gant va hini a garfen skuilh evit va fried kunv Jezuz. Ar c'hoant-se a greske en ene, hag o welet pegen enkreze e oa e livris d'ezan:

« Bez laouen, va breurig paour, rak dizale ez aimp d'an eured a bado da viken; mont a ri, gwalc'het e gwad Mab Doue, gand ano Jezuz a zal'hil bepred en da spered ha me az keddo war dachenn ar justis! »

... Neuz, peb enkreze a yeas eus e galon; an d'ristidigez a oa war e dal a droas e levezeg ha gand an dud en devoz e lavare: « Na pebez gras kaer am eus bet evelato, o kaout eur peoc'h ker c'houek, em ene, p'en em gavan war dachenn zantel ar justis! » Gwelit pebez sklerijenn en doa bet eus an neuv pa lavare e oa santel tachen ar justis: « Ya, a lavare c'hoaz, krenv ha laouen e vezin, ha me 'gav d'in e rankan gedal mil bloaz all c'hoaz pa ouezan e vezoc'h eno ouz va gortoz! »

Mont a ris eta d'e c'hedal da dachenn ar justis hag e peden evitan ar Werc'hez Vari ha santez Katell, gwerc'hez ha merzerez. A-raok ma oa en em gavet e stous da lakat va gouzoug war ar piloz, e the lakat e benn warnan, met ne gavis ket ar peh a glasken hag e peden hag e'ch aspeden hag e lavaren: o Maria! Youl am oa da gaout diganti ar c'has da lakat sklerijenn ha peoc'h en e galon epad e amzerioz diweza... Va ene neuz a oa kel laouen, o veza ma ouien e oa roet d'in va goulnenn, ma ne welen den, daoust ma oa leun ar blazenn a dud.

« Digouezout a eure pelloc'h, evel eun oan habask, hag ouz va gwelet, e vousec'hoarzas. Goulnenn a reas ouzin ober sin ar groaz warnan. Goude beza roet d'ezan e c'houlnenn, e livris d'ezan gouestadik: « Kea, va breur kunv, dizale, e vezi en eured a bado da viken! En em astenn a eure gant habaskter; dizalei a ris d'ezan e c'houzoug ha soublet, en e gichen, e komzis d'ezan eus gwad an Oan. Ne deuas eus e c'henou nemed daou c'her: « Jezuz! », « Katell! » Hag e ser-ris va d'ouglagad en eur lavaret: « Me fell d'in! » hag e figemeris e benn etre va daouarn.


« Raktal e welis an Den Doue a oa e sklerder par da hini en heol... an e-neze a yeas e gouli e gostez hag ar Wirionez a roas d'in da c'houzout e oa savetekt an e-neze dre drugere, dre drugere hepken, hep dellid ebet eus e berz... »

« Pa voe kaset ar c'horf a'chano, va ene a dan-vas eur peoc'h dudius ha kement a c'houez vat a gleven gand ar gwad a oa strinket war va dilhad, ma ne lezis ket her c'has kuit.

« Siouaz! plac'h rouzeudik a zo a'chano, ne livrin ger ebet ken. Penas e c'hellin kenderc'hel da veza war an douar-man? »

Na pebez taolenn gaer: ar pec'her a varv gand keuz d'e bec'het a zo eur breur kurmet; santez Katell a garfe beza bet en e lec'h; en e raok e'ch en em gav, dre nerz ar gwad, etre divrec'h Jezuz hag e gouli e galon.

Ha goude ma n'hon divije evid anaout santez Katell nemed ar bajenn-ze eus he buhez, ne vijemp ket gouest d'en em viret d'he c'harout ha d'he fed.



Iliz Itron Varia 'r Wir Zikour e Gwengamp

Toutes les fois que la Nationalité bretonne sera mise en question, vous verrez briller le patriotisme des Gwengampais.

S. Ripart, Gwengamp, T. 11, p. 26.



Gwengamp a zo savet e kreiz eun draonienn binvidik groumet, a-hell ha tu ha tu, gant menezioz Bre, Bour-vriag ha Mousterus ha tesc'hik gant rouzoz Sant Leonard. Moutbaril ha Kastell-Pik. Kemerit an hent a geroch d'en em gaout enni, iliz an Itron Varia, gant he zourion uhel, a vezo, atao, kenta tra e paru warnan ho taoullagad; eun iliz, hommez, hag a zo eun estlamm gwelet pegen dibradet eo a-zioch mogerioz ledan, kastell krenv, tuez koz, halion ha liozouz ker, dourer ker brao gand dour an Treo; pep kristen ha pep breizad a oar ervat emm eno ti karek Itron Varia 'r Wir

Zikour, brudet mil bell a zo ha ken darompredet atao breman gand ar hardomenien ha m'oa er c'hantvejou tremenet, endra m'edo ar feiz, en he birvidika, e Breiz.

An iliz-ze ne oa ket bet savet da genta, evit beza iliz parrez; savet e oa hepken evit beza chapel kastell Gwengamp; anat a-walc'h eo kement-se pa zeller ouz ar profou a roas dezi an duk Konan IV (1156-1166) hag an dukez Kontanza (1171-1201).

Pemp hali a zo en he diabarz; e tu an hanter noz he deus daou dour hag a zo chomet da veza hag e kreiz toenn an iliz ez eus eun tour all hag a zo heget hag uhel meurber, eur girunennad tour-ribellou en dro dezenn.


Evid ober eun hevelep peh kaer eo bet red, a c'hellit kredi, siaga meur a-woch d'al labour; met, ne ouezer ket mat a-walc'h, pe-gouls eo bet graet pep lodenn anezan. Gouzout a raer hepken e la-keas an Duk Charlez Bleiz, — aotrou Gwengamp,

dre e wreg, bet lazet e tal Alre, d'an 29 a viz Gwengolo 1364, — sevel chapel an Tenzor; gouzout a raer ivez e'od o labourat war ar c'heur, er bloaz 1462. Al lodennou all eus an iliz a zo bet savet er XVIII kantved ha nevezet pe aslennet diweza-toch.

Pe zeller ouz ar peh-labour-ze, o'ch en em lakat dres dirak dor dal tu an hanter-noz e weler an daou dour en o c'haer, tour an holorach hag an tour plat. An tour-man a gouezas en e boull, er bloaz 1535, evel m'hen doug ar skritell-man a lenner warnan c'hoaz:

La vigille saint André, vers le soir,
L'an mil cinq centz trente et cinq
La grande âme piteuse à voir
Fut de ceste tour qui à terre vint.


met a-benn ar bloaz warlerc'h e oa diazezet adarre maen kenta an tour nevez hag al labour a voe graet ker mat en taol-man, ma n'en deus ket finvet abaoe.



Cl. Lemonnier.

Kastell Gwengamp, gwechall

Eun nor dal eus ar re gaera a zo etre an daou dour gand an dauzek abostol en dro d'ez. A-zioch an nor e weler d'ou skoude, kizellet er vein, hag eo, war a leverer, skoudeunou Yann ar Brosse hag Anna Pisselleu a voe restalet d'ezo, leveoc Aotronek Pennentev, o zud koz, gand Fran-sez I, roue Frans, er bloaz 1535.



Iliz Itron Varia Wir Zikour e Gwengamp

Gwir Vretoned oa an holl labourerien o deus kizellet an nor gaer-ze hag o anioñ, Yann ar Moal, Iñji an Noutzece, Yann ar C'hozie, hag Yvon Auffret, hen diskouez sklêr hag anat.

E tu ar sav-heol, e kaver diou zor-dal, hini santez Janned hag hini Itron Varia ar wir Zikour a anvef ar wechall Itron Varia an Halegkoad. Ar porched-se, gant hini Kastell-Paol hag hini Rosvech atao Ilesmou o teurel o c'houez vat e-barz treid ar were'hez, goulou o tevi ha tud o pedi.

Itron Varia 'z wir Zikour a zo gwisket d'ez i ar vantell zeiz glas, broudet gant neud aour ha neud arc'hant; war he fenn e toug eur goulc' seiz hag ar gurunenn aour ha perlez bet roet d'ez i gant Pi IX er bloaz 1857. Gwasa pez a zo, ar porched hag a oa digor gwechall a zo bet klozet, er bloaz 1854,

gand eur gloued houarn, ha n'he deus stumm gaer ebet; an disouzek abostol a weler er porched-ze a zo bet graet gand eur Sant Briegad, ar c'hizeller Ogée.

An nor-dal all, hini santez Janned, a zo bet roet an ano-ze d'ez i, evit dere'hel koun, sur a-walc'h, ens ar vaouez kalonek, Janned ar Pentevr, pried Charlez Bleiz, a vevas hag a varvas e Gwengamp, er bloaz 1381.

Ar skeudenn a zo a-zioe'h an nor-ze, daoust ma toug eur gurunenn a zukez, oa Gwere'hez ar c'helou mat p'eman an ael Gabriel o tont da gemenn d'ez i vezo Mann da Zoue; skeudenn an ael, avat, a zo kollet.

En tu all d'an iliz eman dor an Duked; an dos-



Chapel sant Leonard



Millin her, savet gand an Duk Yann V



Itron Varia Wir-Zikour

dehou c'hoaz eman bez Per Morel, eskob Lanndreger, gimidik eus a Wengamp, ha bet sbelet eno, er bloaz 1401.

E chapel an Anaon e c'heller gwelet taolennou, livet gand an Hienan, eul liver gimidik ivez eus a Wengamp, eun daolenn goz eus a L. V. ar wir zikour ha gwer a lion, livet warno kurun-digez ar Were'hez e Gwengamp hag emgann Patsy. Pel-loch e kavet eun armel goz da virout ar Relegou.

Eur ger breman eus ar pardon bras, Gwechall e oa e Gwengamp eur vreuriezh anvet ar Vreuriezh Wenn, evit staga, dre ar garantez, tud tri renk bras ar vro, da lavaret eo, an dud a iliz, an noblans hag ar bobl. An duk Per II, e-unan, a oa en he fenn, er bloaz 1456. Eur lannet gaer he devoa ha warnan e oa brodet eur fin a deir moudenn gand ar geriou-man dindan, e brezoñg: *Fui, tri neud, a we'h hen torrer*. En amzer-man an emgleo gaer a oa gwechall etre tud an tri renk a zo torret e kement lec'h m'en deus gelllet an Dispac'h gall sankta ennan e gorn hag abaoe n'eo ket bet test ken d'an traou mont kouz en dro.

Ar Vreuriezh Wenn he devoa ivez eur batronezh hag e oa ar Were'hez hag eur goulc' bras d'an eil dervez a viz Gouere. Ar peza a zo chomet en e zav eus a zilerc'h ar Vreuriezh Wenn eo ar prosesion hag eur zervich vras a vez kanet evit kement hini a zo bet enni, duked, aotronek, heleien, bourelizien ha labourerien, hag a oa holl breudeur dirak d'houglad an Aotrou Doue ha re e Varam zantel.

Ar pardon bras a vez graet breman, bep bloaz, d'ar zul kenta a viz gouere; en dere'hent, diouz an noz, e raer eur prosesion hag e weler enni pardonerien a vilierou. Da nav eur, e lec'h ar prosesion

ta oa d'ar c'hastell a oa harpeno. Ouz moer an iliz, en diavez, ez ens diri da bignat war an doenn; an dud aonik arabad eo dezo mont da glask pignat, en hent-se, war an iliz, en aoun da veza mezevennet ha da goueza d'an douar.


An iliz, en he diabarz, a zo tenval; gwaregeier an tu dehou n'int ket graet lann ebet war skouer gwaregeier an tu cleiz, met an dra-ze he ra gaon ebet ouz o braventez. Pa zeller mat ouz ar pilleri, a zong an tour a zo e kreiz an iliz, hag a voug kouz lavaret ar vali greiz, e weler enno roudou pilleri ha gwaregeier kosoc'h hag a zo eus abaoe an XI^e kantved. Ar c'heur a zo bet savet etre ar bloaz 1402 hag ar bloaz 1481. An noer vras, e marb a lion, a zo eus an XVIII^e kantved. Dindan ar c'heur ez eus hezioù, met n'eo ket gwal nes mont betek enno.

Er chapel gonta a gaver en dro d'ar c'heur, en tu dehou, eman bez Rolland Goatgouren, Senechal Breiz, evit Charlez Bleiz hag Aotrou Lok-Maria, e kichenik Gwengamp. Her gwelet a raer, war e vez, gwisket gant e zihad houarn. Uheloc'hik, e kaver taolenn ar Basion, war deir banell. En tu



Iliz Gwengamp

da vont da ober tro ker ; biskoaz, n'eo bet chomet hep mont en hent ; gwelet ez eus bet, bloaveziennou, glao o koueza edoug an deiz, evel ma vijed o teurel gant barazou, met abenn an noz e veze dizolo kaer an amzer !



Eun ti hez stag euz iliz Gvenegamp

Kaer eo gwelet ar bardonerien, peb a c'houlaouenn en o dourn, oc'h ober tro ker, en eur gana meuludi Gwerchez ar Wir zikour a vez douget gant eur strollad paotred yaouank.

War ar blasenn e vez c'houezet an tan e tri dantad. Eur wech dizro ar prosesion d'an iliz ar bardonerien a gendalc'h da gana meuludi ar Werchez ha n'en em demont nemed p'o devez gellet kovez, kaout oferenn ha komunia !

Eur pardon breizat, eur pardon kristen, eur gwir bardon eo c'hoaz pardon Itron Varia ar wir zikour ha c'hoaz an nenv a glever gantan e pevar c'horn Breiz-Izel.

E tour Gvenegamp eman atao ar c'hloc'h bras, bet teuzet gant Guymak er bloaz 1568 evit serc'hout Doue hag Itron Varia Wengamp. Ar c'hloc'h-se a dalv ar hoan lavaret ano anezan c'hoaz. Er bloaz 1591, an hugunoded a oa deuet da lakat seziz war Wengamp. Diskaret e oa ar mogerioù, torret an norioù, ha leun ker a zoudarded. An duhez Anna pa glevas ar c'hloc'h-se a redus dan iliz ha stouet enni war he daoulin noaz e lavaras a vouez uhel :

Ha c'houi 'garfe, Gwerchez Vari
Gwelet ho ti da varchosi
Ho sakristeri da gao gwinn
Hoc'h aoter vras da daol kegin ?

N'oa ket peurlavaret he fedenn ganti ma oa spout bras e ker gant an holl gleier a oa en em laket da zeni o-man.

O klevout ar zon, ar prins de Dombes a lavaras d'e floc'h : « Floc'hig bihan, le a zo skanv, pign da lein an tour plat da welet p'ou a zo o seni ar c'hleier ha ma kavess unan bennak eno, sank da gleze en e galon ! »

Hag ar floc'h d'an tour en eur ganan ; met, kerent e fiskennas en eur grenan :

Beg an tour plat ez oun me bet
Ha den ebet n'em eus gwelet.
Ha den ebet n'em eus gwelet
Nemed ar Werchez venniget
Ar Werchez hag he mah, a-val
Re ze a zo o vransellat.

Ar prins de Dombes o klevet eun hevelep nevezenti a lavaras raktal d'e zoudarded :

— Sternomp hor c'hezeg ha d'an hent
Ha laoskomp o ziez gand ar zent.

G. P.



Peziou Charles Bleiz



Kenta Kentel ar Barz yaouank ⁽¹⁾

Ar glotenn e brezoneg ⁽²⁾

Ha feiz eo ar werzniez vrezek war ar glotennerezh ?

En eur lenn an Ailghieri eo e fionanas evid ar wech kenta ar goulnenn-ze em spered. O klevet o kana d'an dioukouarn e glotennou c'houek, e glotennou lorc'hus, e leuas d'in ar c'hoant da geveria ganto hor c'hlotennou. Pebezh paourentez ! pebezh dienez ! Ya, hep mar ebet. Met gwasoc'h zo, a gavas d'in. Ar goulnenn man a strinkas dioustu diwar va muzelloù : *peur e vez klotenn en italianeg ?*

Dante hel lavare din fraez, yezadurioù hen displegas d'in diwezatac'h : *klotenn a vez pa gengan daou c'her adaleg o taol-mouez*. Dleet eo d'an taol-mouez koueza war ar glotenn ; anez klotenn ebet, nemed treuz-klotennou d'an daoulagad. Klask a ris er yezou all ; hag *holl gwiti buman* e lavarjont henvel : an taol-mouez a rank koueza war ar glotenn. Ar Challaoued a zent ouz an hevelep lezenn ; nemed e galleg an taol-mouez a gouez atao, war ar zillabenn ziveza.

Ar brezoneg ne anavez ket ar reolenn-ze. D'an holl, nemed d'eomp-ni « ez omp, anavezomp » : « gwele, le » ne geganont ket ; d'an holl, nemed d'eomp-ni, seurt klotennou — hag a zo pinvidik eme hor gwerzaouerien, — n'eo ket klotennou int. Ha n'int ket. Perak ? — ar glotenn a rank beza klevet, rak d'ar skouarn, n'eo ket d'al lagad eo, e tle plijout ar werzniez. Hogen d'ar skouarn sillatenn-lost « gwele » a zo evel *mut*, « le », en eneb, a zo eur sillabenn leun. Hag en abeg da-ze ne geganont ket muioc'h eget ne ra e galleg « sable » ha « blé ». Da lavaret eo, an taol-mouez a renk ar gerioù-ze e daou rumm ha n'hellont ket beza touziet, e diou ouenn, diou ouenn dishenvel-krenn : gouenn ar gerioù toniet war ar zillabenn-lost, gouenn ar gerioù toniet war ar zillabenn-bilost ; gerioù eus eur ouenn ne glotint biken gant gerioù eus ar ouenn all ; goulnenn a reont gerioù eus o goulnenn o unan : « gwele, a wele » ;

a kantred, a anved » diouz eun tu ; « le, re » : « tro, bro » diouz an tu all.

Evit merzont ar wirionez-ze, ne 'z eus nemed distaga a vouez uhel an diou werzenn-man, en eur rei d'ezo an ton a zo dleet :

Da guerder atao a gâlin
Tra vo mouez ha buhez ganin.

Klotennou « pinvidik-mor », eme E. Berthou (*Kevin Barzed Breiz*, p. 14). Ya ! d'al lagad. D'ar c'hleved, klotenn ebet, pe me c'houlnenn beza bouzar war an taol. Lemul penadous savet war ar paltram-ze, ha me vo souezet ma ne vez ket hegas set buan ho skouarn, Perak ? — en eur werzenn, an taol-mouez a gouez war ar zillabenn-bilost, en ehen war ar sillabenn lost : diou ouenn dispartiel rik gand ar c'hleved. Ar voaz eo, hag hi tra ken, a ra d'eomp kemeret seurt lostoù evit klotennou. Kengana reomp evid an daoulagad, tra ken. Bouz fall, pe e fazi hon dioukouarn, hag e fazi holl varzed ar bed.

Ar bodh he-unan a zant an dra-ze. Kant gwech evit kant e treuztonio ar gerioù da lavaret : « *ganin-ganin* ». Neb en deus klevet kana hor c'hantikou (mac'hagnet spoutus ar werzniez enno) hen anzavo raktal. An abeg n'eo ket diaes da gaout : anez ne vije ket klevet ar glotenn.

Evelse 'ta, eul lezenn 'zo, lezenn diazeaz ar werzniez-klotennou : « an taol-mouez a dle poueza war ar glotenn ».

J. KERBRIEN.
K. S.

(1) A greiz n'eomp o trei *Kan ar poligant*, a gavo'ch eul nivereun-man, eus a yez Gwened, e yez Leon, hor eus klasket heulia kenta kentel ar Barz yaouank, hag adalek ar miz-man, ne voutimp gwerz nevez ebet ken, ma n'eo ket heuliet ar gentel-man enni gant he oberoù. *Brevez Feiz ha Breiz*.
(2) Ar glotenn = la rime ; taol-mouez = l'accent ; ar werzniez vrezek = la versification bretonne ; gwerzaouerien = versificateurs.



Eur ger adarre diwarbenn ar skolioù

E Frans, ar gouarnamant a c'hoanta ober e-unan pep tra, ha n'eo gouest d'en em denna mat gant netra. O veza n'eo marc'hadour elumetez, hon eus falloch elumetez eged er broioù all, daoust ma paomp ker. Kement a zo graet gant ar gouarnamant a goust ato heredoù, ha n'eo ket souezus. Ar re a zo karget gant-tan da labourat a lavar evel-hen : « Ar gouarnamant eo a baeo. Ma vez koll, n'e ket warnon-me e kouez. »

Hirio, muioc'h eget hiskoaz, e c'hoanta beza e-unan mestri-skol ha diframma ar vugale digant o c'herent. Hen, gouarnamant, ha namn ar gerent, a skolio ar vugale, o zavo, a glasko d'ezo eur vicher. Ar gerent a vezo paet mar bez ret, n'o dezo ken d'ober nemet gwelet o bugale, o kreski, o teski pep seurt traou, o loni da veza alvokaded, medesined, kannaded amañ hag ahont, ha marfeze ministred ; ha perak unan bennak anezo ne deufe ket da veza prezidant ar Republik ?

Hag ar gerent, lod anezo da vihana, a zo laouen, rak tenne e vezo diwar o c'hein ar garg da zevel o bugale ; hag holl o deus fizians da welet o bugale o'ch en em gant ato hag e pep lec'h er renk kenta, rak holl e kredont o deus o bugale eur spered lenn gouest da zesk pe tra.

Divezoic'h o dezo keuz, pa welint petra a c'hoar-vezo. N'eo ket kavet c'hoaz an tu da veza gand aer an amzer. Ret eo kaout bara, kig, amañ ha traou all. Ret eo kaout dilhad d'en em wisk, ha kant tra all c'hoaz. Eus pelec'h e teuy bara, dilhad, penaos e vezo savet tiez, ma n'eus er vro nemet skraberien paper ?

Ezomm zo eus medesined, alvokaded, notered, gouzout a ran. Met ezomm zo arak pep tra eus labourerien, micherourien, evit ma vezo bouet da zebri, ma vezo dilhad, ma vezo tiez, hag an holl draou all a zo ret. Seulvui a vezo a dud o labourat, seul grevioc'h, seul binvidioc'h e vezo ar vro.

Ret eo beza skoliad an dra-ze a zo sklear. Met an holl n'o deus ket ezomm da jom 15 hag 20 vloaz er skolioù. Pa vezer het er skol adalek 7 vloaz betek 15 vloaz, e vez bet amzer da zesk a-walc'h evit en em denna, rak pep hini, goude ma vezo chomet er gear eus ar skol, a c'hell kenderc'hel da studia. Hag anout a ran kalz tud, n'int bet nemet e skolioù bihan, hag a zo dizagellet o zed kerkouls ha teod ar re a zo het er skolioù bras. Perak ? O veza n'o deus poanet, labourer o-unan, ha pindikaet bemdez o spered.

Ret eo beza skoliad an dra-ze a zo sklear. Met an holl n'o deus ket ezomm da jom 15 hag 20 vloaz er skolioù. Pa vezer het er skol adalek 7 vloaz betek 15 vloaz, e vez bet amzer da zesk a-walc'h evit en em denna, rak pep hini, goude ma vezo chomet er gear eus ar skol, a c'hell kenderc'hel da studia. Hag anout a ran kalz tud, n'int bet nemet e skolioù bihan, hag a zo dizagellet o zed kerkouls ha teod ar re a zo het er skolioù bras. Perak ? O veza n'o deus poanet, labourer o-unan, ha pindikaet bemdez o spered.

Pep seurt deskadurez a zo, ha pep seurt micher ive. Gouzout labourat douar, sevel loened, gouzout ar vicher a gemener, a vansoner, a galvez a zo k'ch enorus ha gouzout ar vicher a alvokad, a vedesin, a reus forz pe vicher all. Ha setu aze eun dra a deus da ziskleria a vonez uhel en deiz hirio. Rak klevet e vez re alies tud o lavaret d'ar vugale evel-hen : « Deskit mat er skol, ha ne jomot ket da labourat douar evel ho tad. Choui a c'hoonezo ho para gant ho pluen, hag e vezo brao d'oc'h beza azezet war eur gador epad an deiz e lec'h beza o terri ho korf gant labourou poumer er parker. »

Setu klennel ar Frans hirio. Fae a vez graet war al labourerien douar hag ar vicherourien, ha pa vez lavaret eus unan bennak « hennez a zo skrivagner », e kredere beza lavaret eun dra gac'h.

Ar c'hennel a gresko dre al lezennou nevez em aer o vont d'ober diwarbenn ar skolioù. Dastumet e vezo e skolioù ar gouarnamant an holl vugale o dezo diskozezet da zouzek vloaz kaout eun tammig

spered. Evit neira e vezint savet er skolioù, hag oupen-ze o c'herent a vezo c'hoaz paer.

Eus pelec'h e vezo tenne ar c'hant ? Eus godell ar re a labourou, sklear eo, hag e vezo diou rumm dud evel gwechall. Gwechall, arak ma teuas an Aviel, ez oa sklaved ha tud libe. Niver ar sklaved a oa kalz brasoc'h eget hini an dud libe. Hiviziken e vezo ive e Frans, hag a-berz ar gouarnamant : ar re a labourou gant o fluenn, o dezo labour skav ; hag ar re all, ar re ne vezint ket bet kavet mat da vont d'ar skolioù bras, hag a vezo taollet war o c'hein ar zammou poumer.

Nann, n'eus fizians ebet da gaout er pez a c'hoanta ober hor gouarnamant.

Ar vugale a zo d'ar gerent ; e kalon ar re-mañ Doue en deus hadlet karantez evid o bugale, ha Doue en deus roet d'ezo ar garg da veza ha vugale warno.

Ne c'heller ket mont eneb ar pez a zo het reizet gant Doue. Ha hep wech ma wella hec' lezenn savet gand an dud enep lezennou Doue, lavarit heb aon da fazia : « Al lezenn-ze a zo fall. »

Prezennet eo furoc'h gouarnamant ar broioù all ne reont nemet sikour ar gerent da zevel o bugale, e lec'h klask lenne ar vugale digant o c'herent !

Setu amañ petra lavare, n'eas ket pell, ministr an Deskadurez er Hongri : « Ar skol a zell da genta ouz an hizon (katolik, protestant, jurez). Ma z'eo er bour an hizon evit harpa ar skolioù, ar goumpin pe ar gouarnamant o sikour. »

Ma vije an traou evelse, e pep lec'h, e vije peoc'h ha liberte.

Er Hongri n'emae ket o klask tregas ouz ar re a c'hoanta digeri skolioù. Evit digeri eur skol, n'eus nemet ober evel n'eo merket el lezenn, rei an deskadurez a zo goulnenn, kaout mistri o deus bet eun testen a ouizegez, ha lez eun enseller da zont d'ober eun dro er kol hep an amzer. Ar vugale a gelen ar skolioù libe pe e skolioù ar gouarnamant o deus an hevel pac, ha mont a c'hellont eus skolioù ar gouarnamant er skolioù libe hag eus ar skolioù libe da re ar gouarnamant. An holl a labour evid ar vro hag a zo paet gand ar c'hant ar vro, evel n'eo dleet. Ouspenn-ze, evit peza ar mizou a zo het o sevel eur skol, e vez c'hoaz hep bloaz resevet ar c'hant.

Ar gouarnamant n'en deus nemet eun drederenn eus ar skolioù bihan, hag eus ar skoloù bras en deus nebetoc'h o'hoaz. Hag ez a mat an traou ; ar vugale hag an dud yaouank a reseo eun deskadurez dispar, o c'hatekiz hag o relijion a zeskont ive, hag e vez graet anez tud onest, dereat, a garo al labour, a zalc'ho d'an urz vat, ar yor enor d'ar vro.

E Frans, hor frammasoned a fell d'ezo beza o-unan mistri er skolioù evit laza e kalon ar vugale ar c'hredennou kristen. Pep tra a vezo desket er skolioù nemet ar pez a zo da lakaat ar-arak an holl draou all, ma lavar ar c'hatekiz. Ha petra c'hoarvezo ? N'eo ket dies divinout. Ar vugale-ze, an dud yaouank-ze, hep feiz, ma reiz, ne c'hellint ket beza tud a benn, tud a-urz vat, ne ouzint ket reiz a buhez, hag a-berz hevelep tud n'eus da c'hedat nemet feuz ha dispar. Ra zivallo ar gerent kristen o bugale. Ra lavarint dispart : « Hor bugale a zo d'omp. Ni o savo e doujans Doue. Ha ma klaskit o laerez diganeomp, e kavot dirazo'h tud ha n'o deus ket a aoun rak o skeud. »

J. U.

Kentelioù war al labour-douar

Ar boued-chatal

Komzet hon eus diwarbenn an edou, danvez boued an dud ; breman ez an da gomz d'oc'h diwarbenn ar boued-chatal ha da genta diwarbenn ar re hag eo ar c'hvizienn ar pep wela enno, evel ar heterabez, ar penez, ar ruta, ar garotez, an irvin.

Ar Rabez

Unan eus ar gwella boued a c'heller da rei d'ar chatal epad ar goanv eo ar rabez ; an douarou mat a ro eostlon founnus anezo ; daoust ma 'z int eun nebet dourek e plijont kalz d'an holl chatal, kezeg, saout ha mochi, ar yer zoken ne vezont ket nechet evid o lounka.

Ar gouennou rabez. — Meur a ouenn rabez a c'hounnezer en hor bro ; red eo o dilhad hervez an douar.

Rabez *niek Barres*. (Ovoide des Barres). Rei a ra eun eost founnus ; aes eo da zere'bel epad ar goanv ; re zourek eo, koulskoude, ha ne roump ket kalz a all d'hez goumit.

Rabez *Ekdorf*. Brao int da welet ha n'eus ket kalz a c'hviziou outo. Aes int ivez da denna, p'eo gwir n'int ket doue en douar ; re zourek int ivez, avat.

Rabez *rampel Mauriak*. N'int ket ken dourek hag an douar ouenn hon eus komzet anezo ; rei a reont ivez eost founnus ha n'int ket buan da veina.

Rabez *hanter-skr quenn*. Henvel a-walc'h int ouz ar rabez gwenn, nemed o deus muioc'h a c'hviziou ; goulnenn a reont douarou gwelloc'h ; magus kenan int.

Rabez *hanter-skr ruz*. Eur ouenn nevez eo ha marfeze ar wela eus ar re anavezet betek vromañ.

E douarou krenn ha mat eo gwelloc'h goumit rabez da ober alkool (betteraves de distillerie). Gwechall e veze graet sukr gand ar rabez-ze ; abaoe ez eus kavet gouennou gwelloc'h da rei sukr nemet ne reont ket a eostlon ker puilh ; ar ouenn gaoz ne vez mui gounezet nemet evit tenna alkool anez pe evit rei d'ar chatal. Kalz magusoc'h eged ar rabez all eo rabez ar ouenn-ze ; rei a reont dre zervez arak kalz muioc'h a voned egod ar gouennou all, rak, e c'hellit kredi, ne 'z eomp ket da c'hounit rabez evit eostlon dour.

Etouez ar rabez-ze, ar rabez alkool ruz-wenn (*Betteraves de distillerie à collet rose*) hag ar rabez gwenn dem ruz (*betteraves de distillerie à collet gris*) eo ar rabez.

Douarou ha temps

An douarou krenn eo ar re wella evid ar rabez ; tro a zo da gaout rabez mat e douarou hanter-skav a-bouez tampa.

Ar rabez a c'houlenn douarou tempset mat, ar gwella temps evito eo an teñ hag e kalz tiegeziou e roer an holl deil d'ar boued-chatal.

Ar bizin n'eo ket fall, ken nebet ; met, peurliesha ne dalv ket an teñ.

N'eo ket re ugent karrad teil, d'ar rabez, dre zervez arak.

Diaes eo kaout eost founnus tre gant teil hepken ; red e vezo lakat oustenn temps fostatek ha potasek ; tri c'hant lur super pe gaoch houarn ha kant lur

potas-klorek a zo talvoudus kenan. Ma laker oustenn kant lur a azot sodek ne vezo ket kollet o zalvoudegez.

Ar rabez a c'houlenn douar labourer doun ; an douar, ar gwella ; red eo atao mont betek eun troatad dounder, da nebeuta ; an douar a vezo troet ha douar-vel.

Troet e vez peurliesha an douar, dres a-arak hada ; kalz gwelloc'h eo koulskoude, trei an douar er goanv, goude beza ledet warnan an teñ hag al ludu, rak ar rabez a 'z a doun en douar da glask al ludu. An douar troet er goanv a vezo dilezet hag adtroet pe gentoc'h freuzet gand ar rogerez (*extricateur*) a-arak hada.

An amzer o trei dion wech an douar a vezo adlavet goude, rak kalz nebeutoc'h a louzou a vezo ; an douar blot a blij d'ar rabez ; goude tremen ar rogerez war an douar, mat e vezo her freuz hag her c'h'hrana (roulourat) diou wech. Ar c'h'hrana (roulour) dantek a vezo talvoudus tre amañ da gempenn brao an douar.

Peplous hada. — Hada a raer ar rabez adalek hanter ebrel betek miz mezeven ; koulskoude, ar c'houlz gwella eo etre an deiz kenta hag an dek a viz mae ; o'ch hada abretoc'h, e vez re yen alies an amzer hag ar rabez o devez poan o houarn ; o'ch hada divrezaoc'h, e vez re se'ch an douar ha diaes o lakat da staga, hag oustenn-ze, n'o devez ket a amzer a-walc'h da greski.

Hadet e vez ar rabez gand an hadereze ; eur c'hiz fall eo o hada gand an douar, rak diaes tre int da c'hounnat goude ; 85 santimetr a vezo lakat etre pep roundenn ; alies e laker ar roundenn re dous an eil d'eben, ar pez a zo fall, rak disoc'h e vezo ar c'hounnereze ; falloch eo c'hoaz o lakat re bell rak neuze ne vezo ket stank a-walc'h ar rabez.

Peplous hada. — Peurliesha e vez hadet ar rabez en eur o zouezia gand ludu. Fall tre eo ar c'hiz-ze, rak al ludu a vez kollet p'eo gwir ne vez ket douaret a-walc'h hag alies ivez an had e vez devet gand al ludu ; eun dra all a zo c'hoaz da lavaret : ne ouezer ket petra a vez hadet evelse.

Kalz gwelloc'h eo eta hada an had hepken ha lakat al ludu war an douar arak e drei.

Evel hon eus lavaret c'hoaz kentoc'h, an hadereg gant loaiou eo ar wela ; koulskoude, p'eo gwir eo ker ker ha ma 'z int an hadereze-ze, e rankan lavaret ez eus haderezed bihan gant palourou reun hag a labour mat. Madoc, eus a Lok-ronan, en deus graet d'in, diwar eur skouer a roen d'ezan, eun haderez war der roed rak a labour kalz gwelloc'h eged an haderezed all ha n'eo ket keroc'h egeto.

Hada stank. — Komzomp breman diwarbenn eun dra eus ar re dalvoudusa ; atao, koulz lavaret, e laker re nebet a had en douar ; red eo hada, da nebeuta, seiz pe eiz lur had, dre zervez arak ; anez da-ze, nao gwech war bez, ne vezo ket stank a-walc'h ar rabez ; dister e vezo an eost ; a-wechou e vezo rei eil hada ha gouzout a rit, eil hada ne dalv netra. Eoc'h eo tenna eget lakat.

O klask espern 20 real, e kolloc'h 100 lur. D'oc'h hen lavaran, en eur hada seiz lur da nebeuta, dre zervez arak, en douarou labourer mat ha kempennet a-zoare, ma re abret, ma re zivoat, ne vezo ket rei al hada, eur blovez war hanter kant. Pep bloaz e klevint labourerien douar o klemm dre ma 'z eo bet red

d'ezo eil hada hag atao e lavaran d'ezo: Met perak ne hadit ket stank a-walc'h?

— : Hadet em oa stank a-walc'h ma vijent chomet!

— : Ya! ma vijent chomet, met pa n'int ket.

Goude ma vezo hadit e vezo kranet (roulener) an douar da derri ar poullou ha da starda an douar war an had; aman e'hoaz eo mat kaout eur c'hran dantek.

Dizez e vezo ar rabez ken na vo gwelet ar roudennoù o c'hlas, neuz, a-val, hag ar c'henta 'r gwella, e vezo red o c'houennat hag o rouesaat.

Ar c'houennerez. — Difeo e c'houennat gand ar c'houennerez dre loen, rak darn anezo a c'houenn betek peder ha zoken c'houec'h roudenn d'hozh hag evelse e div eur holorach e vez c'houennet eun dervez ar.

Ar rouesaat. — Pa vez ar rabez teir deliennet eo mall o rouesaat. Atao, koulz lavaret, ec'h en em gemer, re zivezat, gand an lamm labour-se hag e vez disteret kalz an eost. Hag arabad eo rouesaat evel ma ra kalz o lez bodou bihan aman hag a-hont; nann red eo o lakal a-unan, ha nann a zionioù pe a deiron, eun troadid etre pep rabezenn. Ar rabez laosket a re a ra m'hozh a zrong ouz ar rabez all eged al louzeier fall. Mar d'eo bet rouesaat ar rabez gand gopraerien, red eo d'ar penn-tiege, tremen e-unan, dre ar park da denna ar re a zo chomet a re, hep gortoz, an eil c'houennadur, evel ma vez graet alies.

Chouennet e vez, ar rabez, diou wech, peurlies; teir gwech e vefe mat hen ober zoken, ma 'z eus tro.

Ar strem. — Alies, e miz eost pe e miz gwengol, e vez kuitilhet an delioù rabez d'ober boued-chatal; euz chiz eo eus ar re falla, rak kuitilhet an delioù a vir ouz korf ar rabezenn da greski hag ar strem rabez a zo eur boued dister kenan d'ar chafal. Koulsgoude, a-wechou e vez red hen ober, pa n'eus netra all da rei d'ar zant; gwelloc'h eo c'hoaz dizelienna ar rabez eged lezet ar chatal da vervel gand an naon.

An tanna. — Tennet e vez ar rabez e miz here pe e miz du; arabad o zenna re abret, rak kreski kalz a reont en diskar amzer; arabad gortoz re zivezat, ken nebet, rak ar skourm a ra d'roug d'ezo; goude ar benzek a vez here eo eman ar choutz gwella, a gav d'in, da gregi d'o zenna.

Temet e vez ar rabez gand ar bal tri biziek pe gand ar rastell. Evidon-me setu aman penaos e ran; o dibenna a ran da genta gand ar fala ha goudezo e zennan gand ar rastell; arabad kredi e rafé an loullou graet enno gand ar rastell kement-se a c'haout outo; biskoz n'e in eus o gwelot o vreinna.

Strev rabez a vez roet a-wechou d'ar chatal; eur boued dister eo; m'ho peus boued chatal a-walc'h, a-hent all, laoskit i, war ar park; eun temps mat tre eo evid ar gwiniz a deuo goude.

Evit karga ar rabez er c'hirri e kemerer fire'lier a-wechou; buanoc'h graet eo evelse hag ar rabez toulet gand ar forc'h ne vreinont ket kentoc'h eged ar re all.

Ar skourm avat, a ra a-wechou d'roug d'ar rabez; ar re a jom en douar, gand o delioù n'o devez ket a zrong, met ar re a zo dizeliennet a zo kizidik tre. Mar ho peus aoun rak ar skourm pe rak ar reo, kasit eta d'ar gêr ar rabez ho pezo tennet epad an deiz pe da neubeta, grit bernioù bihan ganto, er park, ha goloit i, gand an delioù.

Er gêr, ar rabez a vezo berniet pe el lab, pe el leur; ma chomont er miz, e vezo red o gelel mat gand gouzer d'o miret ouz ar skourm.

Ar Panez

Setu aman eur boued talvoudus ha n'eo anavezet, koulz lavaret, nemed e Breiz.

Ar panez a zo mat d'ar c'hezeg; kement a nerz a roont d'ezo hag ar c'here'h; lavaret a raer e roont d'roug-lagad d'ezo, met eun dra ziaes da gredi eo kement-se.

Mat int ivez d'ar zant hag an amann graet diwar zant hag a zo bevet gand panez a zo mat kenan.

Mat int ivez d'ar moe'h, pe ez kriz pe ez poaz; o rei a c'heller ez kriz d'ar banved (gwiz hag o deus moe'h bihan) pe d'ar moe'h bihan o sevel, goude o zri miz; a-raok o rei d'ar moe'h a zo o larda eo red o foazot.

Ar panez a deu da ger a-walc'h; met da welloc'h mare'had e teufent koulsgoude, da l' — ma vefe hadet ar panez diwezoc'h, pa vez tommet an douar; neuz e tounnont kentoc'h ha ne vefent ket golet ker buan gand al louzeier fall.

D'an l' ma vefent hadet, a roudennoù, gand an hadere; kalz aesoc'h e vefent da c'houennat ha da denna.

D'an lll' ma vefe kavet gouennou panez herroc'h, tefoc'h, hag o defe o femou, eun tammig er miz eus an douar, evel ar pastounadez [ar garotez].

C'hoant am eus da ober eun dra bennak er bloaz-man, evit gwelet ha me a c'hello kroui eur ouenn nevez, oc'h ober eun dibab etouez an had panez. P'eo gwir ne vez gounezet panez, koulz lavaret, nemed e Breiz, arabad eo gortoz e vefe graet al labour-se d'omp gand ar vare'hadourien had gall. An dibab-se a vezo eul labour pell hag a bado epad meur a vloaz.

Olier CHEVILLOTTE.

Respont da unan eus hon lennerien E. J. eus a Blonéour-Trez

Ar c'haoc'h houarn a zo unan eus an tempoù fostatek gwella evit hor bro, p'eo gwir ez eus raz ebarz; ar super n'eo ket fall ken nebet; mat kenan eo rei an daou demps a-gevred; goude melchen, 200 lur gaoc'h houarn ha 100 lur super a vije eun temps mat, a gav d'in.

An demps, dal ma vezo skuilhet war ar park, a vezo golet gand eun taol freuzioù, rak an tempoù fostatek a c'houenn beza douaret evit gelout ober vad; met, pa vezer o temps d'ar gwiniz, arabad eo douara re en holl an demps, rak gwirioù ar gwiniz ne 'z eont ket douar.

Ar gwiniz « Goldenrop » a zo eur ouenn vat; ledan eo o delioù hag, en hent-se, e vougont al louzeier fall kement hag ar segal, Koulsgoude, en douarou mat, e lec'h ma stok ar gwiniz-se e rofen all da c'houennit ar « Vilmorin 23 », eur ouenn nevez hag a ro eostioù eus ar re truilha betek aman. Ar re o deus bet hadet ar gwiniz-se a ro kalz a veuldu d'ezo; met, goude, en reont douarou mat hag a vo labourer ha temp-set a-zoare.

Kervasdoue, 20 a viz du 1927. O. C.

NOZ NEDELEG E BREIZ ER BLOAZ 1794

I

An dra-man, hogale, a dremenne epad an Dispac'h bras, p'edo ar veleien vat dindan guz, e deizio strafuilhoù ar bloaz 1794.

Ar veleien, n'oa ket bet falvezet ganto toni e sentjent kentoc'h ouz ar C'houarnamant eged ouz ar Pab, o devoa kemeret hent an harlu darn anezo ha darn all a oa dibennet. Unanig henning hepken a oa chomet er vro, aman hag a-hont; tremen a raent an deiz, o kousket, er c'houen pe el laner; pa deus an noz, daou choutan, dindan o armou a deus d'o c'hask hag ez aont dre an hent-chout distro, da gas o sakramanchoù d'an dud klanv. Bale a raent didrouz; o daoulagad skler evel daoulagad kaz a vele a-bell hag eun tammig poullr a veze alio en o fuzuilhoù.

Bez e oa unan eus ar veleien valse hag a oa kuzet en eur broskoad; tri pe levar diege diwardro her mage; den, avat, n'hel loje rak hen ober, eur wech, a oa a-walc'h evit beza barnet raktal d'ar maro. Pa veze eomm anezan ez aet etrezek e doull kuz, hag ec'h en em laket da zrevet kan ar gouenni, pe hini ar vran, pe hini ar goungou, herve ar zakramant a c'houennet. Ar beleg a oute raktal petra c'heded digantan hag, hep lavaret ger, e kerze, didrousa ma c'helle, etrezek ar re a oa deuet d'e glask.

Ha setu m'oa digouezet yun ar Mabig bihan; tri dervez a oa, e weled an dud o kuzilikat ha pa deus an noz, war ar miz, ne oa nemet levaljeun ha skouder, evel e kreiz ar gouezeri. Koulsgoude da nnek eur, daoust ma n'oa ket savet al loar c'hoaz, e c'helled gwelot, ouz sklerder ar stered, tud daou ha daou, pe dri ha tri, oc'h en em zila dre douez ar gwez sabr. Eur paotr saout a zouge gant evez, etre e zivrec'h, tamolodet en eur pallell tomm, eur lugel bihan daou viz.

An avel a zoure hag an erc'h a goueze; ar gwez, d'an distera ma vezet hejel, a strabte gant ar skourm; met ouz tron ar c'hoaz, dindan eur bern reier estlammus, e oa eur c'ho; hag an dud a vee enni da glask eun tamm andor.

E goueled ar c'ho, war eun daol vaen, — eul letarn, gant goulu war enaou, e pep penn amezl, — e welet dilhad ofereuna eus ar re bouara, eur c'halar stann, eur vuredad zaar hag eur vuredad win. E tu an Aviel e oa eul levr ofereun golet gand eun tamm mezer louc'h; e tu an Abholot edo ar lugel bihan en e vaillouroù; pebez skeudenn vev ha kaer eus ar Mabig Jezuz a rae ar bugel-ze, er c'heo-ze, da genver noz Nedelec!

Ar beleg hag a oa c'hoaz gantan e zillhad paotr savout, a oa o vont d'o zenna evit lakat e gannus hag e garullen, pa zigmezas e dor ar c'ho, eur c'houerid vaouank, mor-livet, fuilhet e vleo, eur fuzuilh gantan ouz e skouz.

Ar wazed, tenval o fenn, a yeas d'o gaout hag a stardas d'ezan, e zourn :

— Doue n'az miro Desgrand! emezo a vouez izel.

II

Desgrand a oa eur paotr yaouank ugent vloaz ha n'oa ket bet falvezet gantan mont da zoudard. E dad hag e vamm a oa tec'het ne ouiet ket e pelec'h; o madou a oa bet perc'hennet gand ar C'houarnamant; Desgrand n'oa ket evit klevet naug eus tud nag eus traou an Dispac'h.

Bep ha teo evel eun dervenn, Desgrand a oa eur paotr goevn; netra n'helle her skatza; beva a rae evel eur c'huaz gouez; en noz, e kouske e fruilh eur roc'h; epad an deiz e veze o redet ar Re C'hlas, o devoa eun aoun spontus araouan. Eur c'hristen oa eus ar re wella ha dont a rea da glevet ofereun an hanter noz ha da ger'hat plomm.

An holl, gwezet he merched, a bede kalonek. Ar beleg, kenta tra a reas, a voe hadezi ar paotrig bihan, avat, *Frimaire*, war rollou an ti-ker ha Yann Vadezour, adalek neuze, war rollou an iliz. Hag an ofereun a zeraouas. An avel, e beg ar gwez, a gendalc'he da yudal hag ar c'hoaz da vouldal. Edo ar beleg o lemm an Aviel pa deus, beleg an aoter, c'houzadennoù tri zoudard glas, a oa en o sav, e dor ar c'ho, tri gall eus ar sompagaouez parizianed a oa o kalc'ha ar c'hoaz; an diou c'houlaouenn a voe mouget raktal.

A! setu aman eun neizid razed iliz, avat! eme ar c'henta.

— : En em jachit, ac'halese, dre gaer, eme an eil, ha dillo, pe anez.

Der ne lavaras grik. N'oa ket aes en em ganna em; eul lazerez spontus e vije het ha bez' e oa eno merched hag eur bugel.

— Mil gurun! eme an trode, setu aman avat petra eo tapa al lern en o zoull!

Ar zoudarded c'hlas all, o klevet an frouz, a oa diredet warzu ar c'ho; eur c'helc'h a raent e tal e zoz; dastumet o devoa eun toullad kenneud ha c'houezet eun tantad; an avel a gasas ar moged dioutan war ar gristenien geiz; n'ont ket evit padout ken; unan a zout a ranket da ober, pe jom eno ha beza mouget pe goueza etre daouarn ar Re C'hlas; ar beleg o bennigas hag ez efont er miz; ar re holl a oa bet en ofereun hanter-noz a oa tapet.

Nann unan a oa ha n'oa ket bet fizet; Desgrand. Evel eul loen gouez, ha n'eo ket evid ober ken, e oa net war e c'hourvez, hag e c'henou harp ouz an douar, e klaske tenna e halan, gwella ma c'helle, en aoun da veza mouget gand ar moged teo a lenne ar c'ho. Birvi a rae e wad emnan gand ar gouarn.

Klevet en devoa e genvroù o vont tuit hag ar zoudarded gull oc'h ober goap anezo. Mont a eure warzu an aoter ha klask a eure, gand e zourn, en dervalljeun, ar c'halar stann. Hag hen d'ar red, mar gonie warzu an tantad, mall gantan kaout aer yac'h ar menez. Neuze, war e zaulin e kichen an tan, heb eur ger, e kemeras eul loa, e tenzas ar c'halar, hag e voulas unnek hold. Bep wech ma

taole unan d'an douar e rea sin ar groaz warni. Ha goude beza graet e labour, ar paotr yaouank a jomas da zelou ha didrouz, dre hentchoa na ne garfe ket ar bleiz mont dreizo e tec'has ac'hano...

III

Tri dervéz goude, edo soudarded Pariz o pignat eur c'hree'h, o redet ar vro, na petra 'ta, da welet ha ne gavfent ket eur beleg bennak. Er penna a-raok, o fringal, o safari hag o c'hoarzin, edo adarre tri vrabanser noz Nedelec. An erc'h lugernus, dindan bannou an heol, a wigoure loet a ginni louet, a oa e kreiz ar c'hoad, evel eun tarz leun a eionenn e kreiz ar mor; war he c'hern, skanv evel eur gwinter, eun den a voe gwelc'h hag eun tenn a voe klevet gand ar ger-man da heul: Nedelec! Ar c'henta eus an tri vrabanser gall a gouzas war an hent. — Nedelec! eun tenn all hag an cil hrabanser a voe ledet war an erc'h. Diou youc'hadenn, diou luc'hadenn, daou gorf maro!

An trede, penn follet, a c'hourvezas war an hent. Ar zoudarded all a redas warzu ar roc'h. Desgrand, ha n'oa ket evit karga e fuzuilh, a lammias ac'hano, en eun tenn; den n'her c'havias. Ar Be-C'hus a dec'has strafuilhet, o daou varo a jomas el lec'h ma omst krogetez.

An trede ne grede ket mui mont eus e di. Aoun en devoa mantras ha ledrenz a voa kroget emman. Ugent dervez a oa edo eun peder moger ha

ne grede ket zoken lakat e fri er prenest da zellet er miz; ne veze goulou ebet ganfan morse; eun nozvez, o sellet ouz kleuz e lior, e chomas a-ban da zellet ouz eur prevn glas a wele o lugerni etouez ar geot; souezet oa o welet eun hovelep prevn e miz Genver; digeri a eure goustad e stalafou, hag e soullias, goustadik da zellet gwelloc'h.

Eur youc'hadenn skrijus: Nedelec! a voe klevet ha kerket eun tenn a skoas ar zoudard glas en e vruched. Ar prevn glas n'oa nemed eun tamm fosfor lakat war ganol ar fuzuilh evit gelout beza barrek da denna ganti eunoc'h a-ze. Hini eus medvelien an ti ne zibrennas an nor da glask redet warlerc'h an temner: re a aoun a oa 'roazan.

An hini glazet a varvas da c'houlou-deiz, en eur lavaret, heb e anaoudegez: Nedelec! Nedelec! Nedelec!

IV

Desgrand a zo marvet d'e vloaz ha pevar ugent e ti hag e gwede e dadou koz. Eun den kaer oa gand e vleo gwenn, eun den habask, evel eun oan; iexanvel e oa gand an holl Nedelec. Pell a oa ne rena petra ebet ken nemed chedenn chapelodou. Mervel a eure en e wele; eun edo e fuzuilh, a isplih; n'en doa graet netra ganti tri ugent vloaz a oa; harp outi en doa eur groaz koad gand eur yalc'h e vire enni euz eun annek holed en devoa graet gand kalur staez noz Nedelec 1794.

TAOLENN 1927

Table with 2 columns: Name and Value. Includes sections for KANAOUENNOU, MARVAILOU, CHAPELIOU HAG ILIZOZ BREIZ, and TRO VREIZ.

Berniou traou chomet eus a ziere'h an Amerikaned, ar Challaoued hag ar Zaouan. Bouteier, dilhad, mazer, lior, meubli, pivoerou, pallenou, linsellou, zolc'hoioz, matlasennou, hag all.

Entreprises J. PLOUE - J. COLLIERE. 36, rue de Siam BREST. Déménagements - Camionnage - Transit - Transports.

Klanvourien! An efedusa eus al louzeier da grenvaat ha da burat ar gwad eo al louzou diwar iod-mor ha raz-eskern.

Mammou tiegez, ha d'eoec'h bugale bliink, disliw, fall da grenvaat ha diwezet da greski, pe m'erc'hed diates d'ezout d'eo oad-krenn.

Hadou potach ha brouskou, hadou bleunniu. Hadou dibadet eus ar gwella tiez. TI A. HUON. Savet e 1840.


Goulnenn e ti ar marc'hadour ar Zoavon e galleg « Le Plus Chic » Hennez eo ar gwella!

Evit beza asuret mat, en em adresit d'ar gompagnonez LE NORD. evit hoc'h holl asuransou (ar vuez, an tan, an darvoud hag all).

Stalioù Nevezioù Bras Aux Galeries Saint-Martin 108 à 112, Rue Jean-Jaurès. KOANTA NEVEZIOU GWELLA PRIZIOU.

DAMES DE FRANCE 35, 37, 39, Straed Siam, BREST. BRASA STALIOU ER VRO. NEVEZIOU DIANKACHOU-TIEGEZ ARREBEURI TRAOUACHOU PARIZ.

Pompad ha BLEUD NOELLINE a bare Ruzderioù ar vugale NEVEZ-GANET. Ar Pompad Noelline a zo ar gwella louzou ouz SPINACH AR BRONNOU.



Feiz ha Breiz a zo pevar real ar pez.

BREST, MOULEREZ AR SKRIDOU MAT, 4, STRAET AR C'HASTELL



Ar Merour: F. GEORGELIN.